


Mezheven-Gouere 2019 / Juin-Juillet 2019 • niv. 427 • 6,5€

b remañ

Breizh hag ar bed



50 vloaz

Skol an Emsav

ouzh ar stern bepred

hag ivez > Brizhkeleier > Le Guibra > Bouloù Naoned

bep eil miz / 6 niv. ar bloaz
bimestriell / 6 nùmeros par an

brezhoneg

le magazine pour progresser en breton

30€ ar bloaz par an **2,5€** ar miz mensuellement

Anv ha c'hemlec'h | Coordonnées
 Anv / Nom Anv-bihan / Prénom
 C'hemlec'h / Adresse
 Kod-post / CP Kumun / Commune
 Pajz / Tél Postel / Courriel

Koumanantiñ dre chekenn > war anv Skol an Emsav
Abonnement par chèque > à l'ordre de Skol an Emsav

Koumanant bloaz Abonnement annuel > 30€

Koumanant estrenvro Abonnement étranger > 42€

Koum. skoazell adalek Abonnement soutien à partir de 42€

Koumanantiñ a ran adalek an niverenn nevez embannet
 Je m'abonne à partir du numéro en cours
 Koumanantiñ a ran adalek an niverenn a zeu
 Je m'abonne à partir du prochain numéro
 Ne fell ket din kaout ar prof
 Je ne désire pas recevoir le cadeau

deiziad ha sinadur
date et signature


Koumanantiñ evit ar wech kentañ hag ho po ar prof-mañ!

Ce cadeau de bienvenue pour les nouveaux abonnés!

Lavrioù all zo da brenañ e lec'hienn Coop Breizh

D'autres livres en vente sur le site de Coop Breizh

www.coop-breizh.fr



koumanant bloaz 30€ | e-maez ar C'hwech'hikorn 42€ | koumanant skoazell adalek 42€
abonnement d'un an 30€ | hors Hexagone 42€ | abonnement de soutien à partir de 42€

► **dre chekenn** war anv Skol an Emsav
par chèque à l'ordre de Skol an Emsav

► **dre internet** e lec'hienn Skol an Emsav ► www.skolanemsav.bzh
Paeañ enlinenn a c'hallit ober gant ho kartenn-vank (PayPal)

► **par internet** sur le site de Skol an Emsav ► www.skolanemsav.bzh
Règlement en ligne par carte bancaire (PayPal)

dre lamadenn viziek ordinal 2,5€ | e-maez ar C'hwech'hikorn 3,5€ | skoazell adalek 3,5€
Kasit ho tavezennoù-baok (DAB) gant ar sammad da lemel dibabet ► An urzh-paeañ SEPA da sinañ a vo kaset deoc'h gant Skol an Emsav

par prélèvement mensuel normal 2,5€ | hors Hexagone 3,5€ | soutien à partir de 3,5€
Joindre un RIB et cocher le montant souhaité ► Le mandat SEPA à signer vous sera envoyé par Skol an Emsav

Da gas da l' à renvoyer à : #brezhoneg, 8 trolec'h Sant Albin, 35000 Roazhon

Bremañ
Kelaouenn vrezhonek savet e 1990 hag embannet bep eil miz gant Skol an Emsav.
Revue en langue bretonne fondée en 1980 et éditée tous les 2 mois par Skol an Emsav.

8 trolec'h Sant-Albin, 35000 Roazhon
Pajz : 02 99 38 75 83
Postel : bremañ@skolanemsav.bzh
Lec'hienn internet : www.skolanemsav.bzh

Renerez an embann
Directrice de publication
Julie Beauwendre

Pennskridozer
Rédacteur en chef
Samuel Julien

Bodad skridozañ
Comité de rédaction
Anne Broussot, Gwennael Jéquel, Samuel Julien, Fulup Lannuzel, Milo Latimier, Tanguy Legavne

Kemeret a deus perzh en niverenn-mañ :
Oñt contribué à ce numéro

Dijbril Aatf, Arnaud Abdul-Sater, Julie Beauwendre, Mich Beyer, Denez Bodat, Anne Broussot, Erwan Burbann, Katiell Chantresau, Nikolaz Davalan, Laurence Guillo, Gwennael Jéquel, Samuel Julien, Annaig Kervella, Valérie Kervella, Katalin al Lann, Fulup Lannuzel, Milo Latimier, Tanguy Legavne, Erwan Lhermenier, Melaine Looten, Olier ar Mogn, Pêr Morvan, Paskal Nignol, Virginia Pronost, Christine Talarmin, Alain Tarcein, Maksim Touzé, Benedek Vernon

Adienn, divankout
Rédaction, correction
Anne Broussot, Mich Beyer, Fulup Lannuzel, Milo Latimier

Sekretouriezh-skridozañ, pajennaosañ
Secrétariat de rédaction, mise en page
Milo Latimier

Sekretouriezh
Secrétariat
Bastien Barbé


Kontouriezh
Comptabilité
Christine Guyon

Skouenn ar bajenn 1
Image de une
Clara Beauwendre

Moullañ
Impression
Printcorp www.printcorp.fr
6 bal Clémenceau, 22000 Saint-Brieuc

Koumanant
Abonnement
koumanant-bloaz : 39€
abonnement d'un an : 39€
koumanant e-maez estrenvro Frañs : 49€
abonnement hors France métropolitaine : 49€
koumanant skoazell : adalek 50€
abonnement soutien : à partir de 50€
koumanant@skolanemsav.bzh

CPPAP 1116 G 88732 ISSN 0246-5264
Evit kaout an niv. CPPAP eo bet lakaet e galleg ar menegiñtel er bajenn-mañ ha war ar golo.



Tauliad > P 17-23
Skol an Emsav, ouzh ar stern abaoe hanter-kant vloaz

ar gelaouenn

4 Soñj & disoñj
Un ditab kelaer embannet e Bremañ gwechall.

5 Pennad-stur & Kronikenn
Geri ar skridozañez ha "N'eus netra skiantoc'h !"

30 Lizheroù & kemennadennoù
Kemennadennoù liesseurt bet kaset d'ar gelaouenn.

ar bed

6-7 Bremañ er bed
A bell zo e Kiever kontz eus breizheleer.

8-9 Anavezout ar bed
An Impalaer santel hag e gastell souzhus.

10-11 Broioù & pobloù
Kamp an Amerikaner e Brest e 1917-1919.

Breizh

12-13 Bremañ e Breizh
An devarn Le Gubra e Sant-Sulieg-ar-C'hoad.

14-15 Bevañ e Breizh
Skolioù div yezh enno pe skolioù disrannet ?

16 Bevañ e brezhoneg
Geriaturzh, ur gerlud evit unan ar gerludurioù !

tauliad

17-19 Ur sell war Skol an Emsav en 10 vloaz tremenet
...ha war ar c'helenn brezhoneg d'an dud deuet.

20-23 Petra eo Skol an Emsav evidoc'h ?
Un dornad testennoù digant tud bet e Skol an Emsav.

sevendur, dudi, sportoù

24-27 Sportoù & yec'hed
Grit anavezoc'h gant c'hoariz bouloù Naoned !

28 Lavrioù arzoù embann
Ul levr brezhonek, unan divyezhek hag unan e galleg.

29 Broued
Piguall Molevez (gant Kigi) ha dani fer koural (hep Kigi).

➤ Kemerit perzh !

N'ho peus ket bet ho kwalc'h gant ar pezh ho peus lennet en niverenn-mañ ? Karet ho piñe lenn pennadoù diwan-benn trabou all ? Anavezoc'h eo rit tud a gas war-raok ul labour pe ur stourm bennak hag a gafech brav reñt da anavezout ?

Soñjoù evit an niverennoù da zont, kinnigoù pennadoù-skrid, tresadennoù awenet gant ar c'helenner, skouennadurioù a cheñt-kes da vremañ, evel-just.

Ma fell deoc'h kemer perzh en un duare don ha padus a cheñt en ober ivez : degemeret e vo a galon vat izili nevez gant Skol an Emsav evit luskañ buhez ar gelaouenn.

Evit serveniñ rit : bremañ@skolanemsav.bzh



Er rann "Soniñ & disoniñ" e venegomp ar pezh a gaved da lenn e pajennoù ar gelaouenn *Bremañ* dek, ugent ha tregont vloaz zo.



30 vloaz zo > Gouere-Eost 1989 > niv.94-95

➤ Kelenn brezhoneg e bro Pariz

Fonnukenañ e oa ar prederiadennoù liesseurt en niverenn 94-95 eus *Bremañ*. Re a vutun, a voeson ha bouzaras ar sonerezh e Gouel Broadel ar Brezhoneg e Karaez, da skouer, pe choazh petra eo ur fest-noz gwir pa gaved d'an aozer e oa ar festoù-se o treiñ da "galibañ". Traoù siriusoc'h a oa, evel an enep-sponterezh e Frañs hervez skridoù Serge Quadruppani, Jean-Yves Meudeg ha Gilbert Kabon kraouiet gant ar polis hep na vefe tamallet tra ebet dezho, ha talvezout a ra ar boan kemer perzh e strolladoù politikel evit kas stourm Breizh war-raok, an ezhomm da sevel ur sindikad evit ar skolaerien ha kelennerien vrezhonek... Ur pennad hir ha kentellus a-walc'h a oa ivez gant izili ar gevredigezh KBDP a gelenne brezhoneg e bro Pariz. Tost 400 lisead o doa gellet heuliañ kentelloù brezhoneg e eizh lise, a-drugarez da bevar c'helenner. Hervez un danevell gant Ofis ar Brezhoneg e 2007 e oa bet betek 500 lisead en ur pemzek lise bennak o teskiñ brezhoneg e bro Pariz. Un harz d'ar c'helenn-se a oa bet lakaet da vat gant an deskadurezh Stad er bloazioù 2000.

20 vloaz zo > Gouere-Eost 1999 > niv.214-215

➤ Poellgor an Tarv : arz ha yezh

Ur pennad fonnu a oa bet savet gant Lukian Kergoat e niv. 214-215 *Bremañ* diwar-benn Poellgor an Tarv, ur gevredigezh a oa he fal lakaat "un divyezhezh oberiant" da veviañ e-diabarzh labour krouñ arzoerien eus ar vro. E penn Poellgor an Tarv e oa Arnel ar Sech, anavezet bremañ dre he livadurioù hag he romantoù evit ar vugale (un toullad anezho zo bet embannet e brezhoneg gant Keit Vimp Bev). En he c'hichen e oa ivez al livourien Pêr-Yann Morvan ha Fañch Vignault. Estreget livourien a gemere perzh er Poellgor avat: kizellerien, neuzierien, priourien, skrivagnerien ha troerien a oa ivez. Frank e oa pep arzoù da grouñ evel ma kare, labour ar Poellgor a oa reñt tro d'an arzoerien da geñañ ouz skrivagnerien ha da genlabourat. Skipailhoù a veze aozet etre ul livour, ur skrivagner hag un troer. Ur plas a oa dre ret evit ar brezhoneg er fin. Lidet e veze an oberennoù ha skridoù ingal bep bloaz e salsoù "Awen Breizh". E 2017 e oa bet lidet ugent vloaz ar gevredigezh.



10 vlez zo > Gouere-Eost 2009 > niv.333-334

➤ Dilennadeg 2009 Breujoù Europa

Èl ar blez-mañ e oa bet dalc'het dilennadeg Breujoù Europa e miz Mae 2009. E *Bremañ* e oa anv ar c'hementad nechu a votourien en Unanlezh Europa d'ar mare-se : ne oa nemet 42,93% ag an dud enskrivet hag a oa bet 6 votiñ, ar pezh a oa un digresk e-keñver pemp blez e-raok. Disoc'h ar vouezhiadeg avat a oa hañval doct'h hani 2004 : ar PPE (strollad europat ar viroerien) a oa arzu e penn get un 260 sez bennak, padal e oa bet un 200 bennak get ar PSE (strollad europat an demokratek sokial). Dek vlez ar-lerc'h eo c'herc'het kalz stad an nerzhioù politikel er Breujoù : da gentañ eo kresket buan live an tu dehoù pellañ betek donet da vout an tuad politikel pennañ e Frañs hag er Rouantelezh-Unanet e 2014. Get dilennadegoù 2019 eo daet ar pleg-se da vout anatoch choazh kar ouzhpenn 100 kannad ag an tu dehoù pellañ zo bet dilennet (un 60 bennak e 2014). Strollad ar frankizourien (arvet RE bremañ) zo kresket ivez ha digresket eo live strolladoù dehoù ha kleiz "klaseñ". Anatoch eo pouez an enebiezh etre ar frankizourien hag an tu dehoù pellañ e Frañs ivez a-c'houde an dilennadeg prezidantel mes gellat a rahe talvoud evit ar peurrest eus Europa e-raok pell.

Adperc'hennañ ar yezh, ur stourm pemdeziek

"Ur stourm pemdeziek ha hir eo hini Skol an Emsav. Gant ma vo e pep lec'h e Breizh, e kement kêr, bourk pe garter, kreizennoù a stourm ha tud o labourat asambles, e chomo bev pobl Vreizh hag ec'h adkavo he fersonelezh". Setu ar pezh a c'haller lenn e *Breizh* : Naoned, Roazhon, Treger, Gorre-Leon, Goueled-Leon, Kerne-Uhel, an Oriant, Gwened... ha Pariz. Bepred eo ur stourm pemdeziek komz brezhoneg, kelenn brezhoneg, ober gant ar yezh, treuzkas anezhi, e pep lec'h. Setu 50 vloaz e stourm Skol an Emsav evit adperc'hennañ ar brezhoneg, hor yezh. Un diforc'h bras zo etre kelenn brezhoneg d'an dud deuet e 2019 ha kelenn brezhoneg d'an dud deuet e 1969 avat. Emdroet eo kalz ar bedagogiezh en 50 vloaz tremenet, an teknikoù, an hentadoù kelenn, an hentennoù. E 2019 e c'haller mont da vrezhoneger pe brezhonegerez ampart pe ampartoc'h e-korf y miz. Koulskoude, bev-mat e oa ar brezhoneg c'hoazh er gevredigezh e fin ar bloavezhioù 1960. Hiziv eo deuet da vezañ yezh ur gumuniezh, kumuniezhig ar vrezhonegerien. Gwir eo, morse n'eus bet kement a vugale skollataet e skolioù divyezhek pe dre soubidigezh, morse n'eus bet kement a oadourien enskrivet e stummadurioù hir, morse n'eus bet kement a gleveted e brezhoneg, morse n'eus bet kement a arc'hant gouestlet d'ar yezh, morse n'eus bet kement a dud o labourat gant ar brezhoneg. Daoust da se, morse marteze n'eo bet ken bitous plas ar brezhoneg er gevredigezh koadedel. Bev e chomo ar brezhoneg diwar-bouez yezh en o labour hag en o buhez prevez, evel-just. N'eo ket "chom bev" hepken a fell deomp, koulskoude. Ne c'haller ket bezañ laouen gant "sellit 'ta, n'eo ket marv ar brezhoneg!". Dont da vezañ yezh ar gevredigezh en-dro eo galvedigezh ar brezhoneg. Siwazh, ne c'hoarvez ket gant ar pezh a vez graet bremañ ha splann eo, kevredigezhel ha politikel e vo an diskoulm. Da Vreizhiz da lakaet e penn ar galloud ar re a venno ober eus ar brezhoneg yezh ar gevredigezh en-dro.

skipailh Bremañ

Kronikenn N'eus netra skianteloc'h ! gant Tanguy Legavre

Vakañsoù e Portmeirion

Dic'hartzog eo arvest ar plant arallvro e liozh Inverewe. Sañset eo hin an Uheldiroù Skos bezañ re griz evit kresk plant ar Su. Koulskoude, levezon ar Gulf Stream zo aze. Dic'hartzog eo arvest an tiez arallvro e kreiz-kêr Portmeirion. Sañset eo hin kontelezh Gwynedd e Kembre, bezañ re louet evit sked tiez ar Su. Koulskoude, levezon Clough Williams-Ellis' zo aze. Gellout a reer tabout evit gouzout hag-eh e klot patrom kened ar Su gant endro Kembre an Norzh. Evelkent, deuet eo Portmeirion da vezañ brudet er bed a-bezh dre he moerigoù o livioù lintrus ha dre stummoù he zoennoù. Klotañ mat-tre a ra ar c'hinkladur-se gant aergelc'h strad skingvel ar bloavezhioù 1960. The Prisoner. Pa vezer o poumen e straedoù Portmeirion, n'eus ket ezhomm da gaout un ijin diharz evit klevout Patrick McGoochan, "niverenn 6", o huchal : "I am not a number, I am a free man!". Hanter-kant vloaz zo tremenet. Dic'hizet eo ar vell wann divent. Re luziet eo reolennoù ar c'hoari echedoù. N'eo ket aotreet ken plantañ tizh gant ul Lotus S.



Laurenn c'hoari echedoù The Prisoner e kêr Portmeirion.

Neuze, peseurt skeudennoù a vije ret da azerien ur strad bremañ implijout evit diskouez moustradur ur gevredigezh e-keñver ur prizoniad ? Dont a ra da vezañ niverusoc'h-niverusoc'h ar re o deus div identelezh : unan fizikel hag unan niverel. Gellout a rafe un aozadur Stad bac'hañ identelezh niverel ur c'hazelenner ha lezel anezhañ da bourmen er bed fizikel. Diaes e vefe buhez an den-se ma vefe kemmet e skridoù dre guzh, ma vefe lakaet arc'hant kuzh en e gontoù ofisiel, ma vefe skignet skeudennoù o tiskouez anezhañ en oberoù mezhus war ar rouedadoù sokial. Tres ar gwir war ar gaou, tres ar gaou war ar gwir. Ouzhpenn-se e c'hell ar meziantoù digejañ an dremmoù en un engroez ha heuliañ pep hini dre vilendall ur veurgêr. Funtioù dindarvor zo gouest da sunañ ar roadennoù treuzkaset a vro da vro. Treuzwelus eo an identelezhioù niverel.

"Ne 'm eus netra da guzhat" eme ar c'heodour leal d'eo Stad. Evelkent, piaouañ ur galloud divent ha chom hep implijout anezhañ a zo ur gwir demptadur evit ur velestradurezh hag a glask bezañ evedusoc'h-evedusoc'h. Er bed bremañ e tefe Patrick McGoochan huchal : "I am not an algorithm, I am a free man !"

Evit ar re n'o deus ket komprenet e reer war o zro evit o mad, ne vefe ket didalvoud bodañ anezho en un lec'h sioul, pell diouzhib trubuilh ar meurgêrioù. Ur goudor a-zoare a vefe enezenn Jura, e Skos. Eno e c'hellfe ar peoc'h, pe tasman Georges Orwell, en em silañ en o speredoù peurskuizh...

1. Un arkitekour owenet gant heol splann ar mor Kreizdouar.



Un delwenn eus an douez Fama e Dresden (Alamagn).

Brizhkeleier Brud fall betek ar mor brud vat e toull an nor

Pell a-raok donedigezh Twitter e veze bezet an dud dindan brizhkeleier. E Roma gwezhall e oa enkorfet nerzh ar brud e stumm an douez Fama¹, div drompilh dezhi : hini ar brud vat hag hini ar brud fall, hini ar c'hozh kaozioù mar kavit gwell. Gant an eil e oa gouest da lakaat brud unan bennak en arvar, ken prim hag ul luc'hedenn.

hiziv, ma 'z eus un den hag a zo deuet da vezañ ur mailh evit skignañ brizhkeleier eo ar prezidant stadunanat Donald Trump. Gouest eo hennezh da vezañ ar rouedadoù sokial gant *fake news*², falskeleier pe brizhkeleier a bep seurt, dre e gont Twitter. Renablet e oa bet gant ar *Washington Post*, d'an 30 a viz Here 2018, 6 420 a lavaredoù touellus pe dirir zoken skignet gantañ dindan 649 deiz en Ti Gwenn. Da lâret eo un dek bennak bemdez well-wahz. Estreget en Amerika e vez dornet gevier evelato. E-pad ar prantad kabalañ evit dilennadeg ar prezidant e Frañs e oa kaoz eus Emmanuel Macron, c'hoant gantañ da ziazezañ ar Charia e Mayotte tra ma veze gvelet Jean-Luc Mélenchon ingal gant un eurier Rolex 18 000 € an tamm. Gevier ! Ya, gwir eo, met gevier kanet ha diskonet war ar rouedadoù sokial... Sed aze un droug eus ar bed bremañ, o dam ya, anat. Ha gwir eo kement-se ?

TWITTER, HËR AN HENAMZER ?
Hadañ gevier evit touellañ an dud hag ar meno foran a zo ul lodenn eus ar stourm politikel abaoe an Henamzer. Er 6^{em} kantved an istorour bizantat Prokopios Caesarea a skigne brizhkeleier (e-touez

ar re goshañ en istor marteze) a-enep impalaer roman ar Reter. Embann a rae (diwar guzh, anat deoc'h) *Istor Kevrinus Justinian* ul levr leun a gofichennoù born. Ennañ e veze skrivet an impalaer hag e wreg, eñ evel ul loen gouez divarre koulz hag hi evel ur c'hast kriz ha c'hoantek anezhi. Ur bern "anekdota" hag a oa o fal louzañ brud Justinian³.

GWALLVRUD HA DEMOKRATELEZH
E 400 a-raok J.K. edo an demokratelezh o tiwanañ en Aten. En amzer-se o doa an holl dud gwir da gemer ar gomz. Ar gwallvrud a oa un doare "choañ broadel"⁴.

An Hellee a oa anezhi ul lez-varn pobl renet gant keodediz tennet d'ar sort ha douget da ziskulañ torfedoù ha felladennoù o c'hegeodediz. Dreist-holl evit o mad o-unan. Rak a-wechoù e veze dastumet gant an tamaller ul lod eus an delgastiz paet gant ar re gondaonet. Ar falsprezegeier a oa techet neuze da zuañ o nesañ eus an eil tu d'egle. Eskemet e veze gwra'chajoù ha brozennoù war an Agora, er c'hibleldoù, ar banveziou, e-tal ar feunteun foran... Archant, avoultriezh, galloud ha kement zo... Yann Geodad ha Katell Geodadez an Henamzer a oa, da gentañ-penn, anavezet dre ar pezh e veze lavaret diwar e benn pe he

fenn. Hag an teodoù a c'hall bezañ flemmus evel ma ouzit a-walc'h !

UN HENTENN GOZH-NOE

E dibenn ar 14^{em} kantved, e-doug ar brezel Kant Vloaz, roue Bro-C'hall a oa bet lakaet da foll. Bech a oa savet neuze etre an Armagnaged, anezho harperien dug Orleañs, hag ar Vourgignoned a soutene Dug Bourgogn evit gouzout gant piv e vefe bet da'c'het ar rejañs. Ha setu boulic'het un emgann all ha brudoù e-leizh o redek dre Bariz... E-barzh *Le Journal d'un Bourgeois à Paris* peurgetek, un doare kronik eus ar Brezel Kant Vloaz, skrivet gant un azer dizanv. Enni e veze kontet traoù a bep seurt, da skouer, penaos en dije un Armagnag anvet Boudard lakaet lazhañ holl annezidi karter ar "chochur" e 1418, a-raok donedigezh ar Vourgignoned er gêr-benn. Goude e oa bet displeget gant forzhik a vunudoù penaos e vije bet toullgofet dougerzed evit kregñ didreuz e-barzh o c'hrouell hag o lakaat ouzh ar ber ! Gevier ! Empentet penn-da-benn gant ar Vourgignoned.

Disoc'h : miliadoù a Armagnaged drailhet gant ar Vourgignoned gant skoazell pobl Pariz maniet gant ar vrud (mouezh ar bobl eo mouezh Doue, 'keta ?),



M. Shauloff, Craighoad, The White House from Washington, DC

A-us, Donald Trump, prezidant Stadoù-Unanet Amerika bremañ.

A-zehoù, Colin Powell, sekretour-Stad stadunanat e 2003.

A-zehoù mik, keleier Antenne 2 e 1986 diwar-benn kroumoulenn skinoberiek Tchornoby, adskignet en un abaden eus Arzel sur image, diwar dielloù an INA.



World Economic Forum, Wikimedia Commons © i © J.O.



Journal télévisé Antenne 2 - 30/04/86
Pep gwir mest stich.

GWEZHALL DIOUZH GWEZHALL, HIZIV DIOUZH HIZIV, EMEZT C'HWI ?

Chwech kantved diwezhatoc'h : d'ar 5 a viz C'hwevrer 2003, en Aozadur ar Broadoù Unanet (ABU), ar wech-mañ. Sed aze ar pezh a oa bet embannet war ar groaz gant ar sekretour-Stad amerikan Colin Powell, d'ar bed a-bezh : "*Saddam Hussein en deus armoù distruj a-vras hep mar ebet, ha gouest eo d'o fradiñ a-vernioù evit lazhañ kantadoù ha milieroù a dud*". Ur falsdisklériadur adskignet gant an velestradurezh stadunanat hag a dalvezo da zigarez da aloubiñ Irak e miz Meurzh 2003. Gallout a rafed lieskementiñ ar skouerioù da viviken. Da skouer e-doug ar Brezel Bras e oa bet embannet er gazetenn *L'intransigent* kement-se : "*Ar boledoù a*

vro Alamagn n'int ket ken dañjerus hag hor re, gloazañ a reont met ne lazhot ket". Start e kavit lonkañ lostoù leue e-giz-se ? Kredif a ra aes an-unan ar pezh en devez ezhomm da gredif.

LIVAN GEVIER EVIT DISPONTAÑ

Seul vrasoc'h, seul welloc'h, gant ar pal dispartañ an dud ar wech-mañ : d'ar 26 a viz Ebrel 1986, war-lerc'h gwallreuz Tchornoby. Pennadurezhioù gall an nukleel o doa klasket disteraat ar pezh a veze graet ganto un "darvoudig". Na rit ket biloù toudoù, ar goumoulenn skinoberiek zo chomet a-sav rik war hon harzoù, oc'h ober he mad eus doare an amzer. D'an 30 a viz Ebrel, e keleier Antenne 2 er skinnel, e oa bet diskouezet d'hon daoulagad bamet, kartenn Frañs hag ar arzoù er Reter kinklet gant ur

pezh mell panell, warni ar ger "STOP". Fou ! Mli bennozh da uhevan an Azorez ! It pelloc'h, n'eus mann ebet da welet ! En gouzout a reer bremañ, ar gaouad pistrus he deus nijet a-us Frañs devezhoù-pad ha kontammet gant reter ar vro ha Korsika. En he roudeñ e savo un hir a rendael atomek hag a gendalc'h hiziv choazh da vagañ ar gomz.

Denez Bodat

1. Ar gerioù gallek *diffamation*, farnoc'h hag ar gerioù saozneg *fake news* ha *famous* zo bet savet a-ziv ar hec'h anv.
 2. E gallek e vez allet ober gant ar ger *mox* gant ar *Commission d'enrichissement de la langue française*.
 3. Dave da istor Sokratez hag ar c'hedig.
- Danvez tennet diwar al levr : *Les fausses nouvelles, un méli-mêlé de bruits et de rumeurs* gant Philippe Bourdieu ha Stéphane La Bras, embannet gant Cheo (2018).

Castel del Monte ul lec'h digenvez e-kreiz ar mojennoù

© Samuel Julien

E-kreiz neblec'h war ar maez e rannvro Puglia, en Italia, ez eus ur c'hastell souezhus anvet Castel del Monte. Souezhus rak n'eo ket ur c'hastell-kreñv evel ar re all hag e stumm - doare un eizhkorneg - a ziskouez levezon sevenadurioù disheñvel. Peadra zo da vezañ souezhet ivez pa ouzer eo arouez un impalaer hollc'halloudus, Frederig II. Abalamour da gement-se eo bet lakaet war roll glad an denelezh kercent hag er bloavezh 1996.



Castel del Monte, proviñs Bari e rannvro Puglia.

C'hwec'h an diaoulerezh a oa war Frederig II an Impalaer-rieh Santel. Renet en doa en 13th kantved war meur a vro ha deuet e oa a-benn da zastum dindan anv, ha d'an oad a 36 vloaz, meur a ditl : en o zouesk hini roue ar Romaned, roue al Lombarded, roue a Sikilia, Impalaer Santel (roman-german), kont a Vour-gogn... ha roue Jeruzalem zoken ! Ken galloudus e oa ken e oa trelatet ar pab d'ar mare-se gant diskar anezhañ e doare pe zoare : dre ar brezel boulc'het gantañ war-eeun, dre eskumnugañ anezhañ dre ziv wech pe dre al lesanv "Antekrist", bet roet dezhañ gant ar pab Gregor IX e-unan.

UN IMPALAEER LESANVET "SEBEZ AR BED"

Koulskoude, piv en dije kredet e vije bet ken dreistoridinal planedenn mab an impalaer Henri VI, a oa bet dilezet war enez Sikilia, da-heul marv e dud ? Rak, hervez kronikerien an amzer-hont, e oa dreistsperedek ar roue yaouank. Desavet e oa bet gant tud liesseurt - Arabed an enezenn dreist-holl - desket war meur a

skiant evel ar metafizik, ar medisineriezh pe c'hoazh ar falchunerezh.


Gallout a reas neuze Frederig tennañ gounid eus an endro liessevenadurel a rene e Sikilia d'ar mare-hont : Germaned, Gresianed, Arabed, Alamaned evel e dad, pe Normaned evel e vamm, a veze kavet e-leizh o vevañ asambles e peoc'h dibaoe ren ar roue norman Roger II, tad-kozh Frederig. Alese e teue ivez donezon ar roue yaouank evit ar yezhoù. C'hwec'h yezh disheñvel a vestronie d'an nebeutañ : latin, alamaneg, normaneg, gresianeg, arabeg ha sikilianeg. N'eo ket souezhus neuze e vije bet lesanvet *Stupor mundi*, da lavaret eo "sebez ar bed" pa oa bev c'hoazh !

UR C'HASTELL PEURBADEL KEVRINUS


Koulskoude ne chom ket kalz a roudoù fetis eus an impalaer sebezus-se, ken hardizh e oa bet distrujet oberoù an impalaer gant ar babelezh. E-touesk ar roudoù-se e kaver Castel del Monte. Nebeut a dra a ouzer diwar-benn orin ar c'hastell. An darn vrasañ eus an istorou-

rien a soñj dezho eo bet empennet gant Frederig e-unan. Ar sifr 8, arouez ar beurbadelezh, a vez kaval ingal, ha seblantout a ra bezañ bet savet diwar skouer moskeenn "Bolz-to ar Roch" e Jeruzalem pe chapel ar palez en Aachen (Nordrhein-Westfalen en Alamagn), arouezioù relijiel pouezus-kenañ evit Frederig. Chom a ra boud an istorourien gant ar rag hag ar perag eus bezañ ar c'hastell, dre ma ne seblant na strategel nag aes evit stallañ annez ur roue, ken digenvez m'emañ e-kreiz maeziou sech kreisteiz Italia. Leun eo ar c'hastell a arouezioù kevrinus ha meur a skiantour o deus klasket kompren peseurt poell a oa ennañ... en aner betek-henn.

N'eo ket souezhus neuze en defe Castel del Monte awenet saverien leuren-filmañ *Le nom de la rose* (1986), film Jean-Jacques Annaud savet diwar romant Umberto Eco, *Il nome della rosa* (1980). Rak e-touesk an holl vartezeadennoù a vez kinniget diwar-benn implij ar c'hastell, e vez meneget alies e vefe anezhañ un doare templ ar skiantoù, pe c'hoazh templ an steredouriezh.



Stumm souezhus un eizhkorneg zo d'ar c'hastell.



Matthias Copernicus 1474-1543

SKIANT DISKIANT... KAVOUT YEZH KENTAN AR BED

Trelatet e oa ar roue gant ar c'hoant da c'houzout ur bern traoù, a bep seurt. Abalamour da se en em ouestias da veur a oberenn ha gouenni o ali digant ur bern skiantourien. Mont a reas a-enep reolennoù ar pab zoken p'en doa roet e asant evit diskejañ korfoù-marv tud. Hervez kronikoù Salimbene, ur manach eus ar vro, e klaskas ar roue, pa oa yaouank c'hoazh, gouzout peseurt yezh e oa hini Doue, ha ma oa eus ur yezh hag a c'helle diflukañ eus genoù an duh en un doare naturel.

Hervez ar gronikenn, evit arnodin kement-se e roas urzh d'un nebeud magered da zesevel bugale zo hep rannañ grik ganto. Un urzh groñs e oa, ne challent distagañ ger ebet, rankout a raent chom mut ha diseblant pa raent ober war dro ar vugaligoù. Dre an taol-arnod-se e klasko ar roue gouzout e peseurt yezh e vije bet distaget gerioù kentañ ar vugale. Respont ebet ne voe roet dezhañ dre ma varvas abred an holl vugale.



© Samuel Julien

Mont tre pennañ ar c'hastell.

AWENET FRANÇOIS TRUFFAUT

Diaes eo gouzout ha gwir pe get e oa ar pezh en deus kontet ar manach en e gronikenn, met pa ouzer un tamm peseurt personelezh a oa d'an impalaer ez eus peadra d'en em soñjal. Dilazet eo bet gant an holl pe dost enklask yezh kentañ ar bed. Chom a ra souezhus avat relegoù an taol-arnod skrijus-se en hon amzer. Meneget e oa bet da skouer gant François Truffaut e kâr Cannes evit diskouez pegen rekis eo an darempredoù sokial gant kement krouadur a zo. Diwar istor taol-arnod an impalaer Frederig e oa

deuet dezhañ mennozh e film *Les 400 coups* er bloavezh 1959. Kaoz a zo er film eus ur paotrig daouzek vloaz, Antoine Doinel, hag a ra troiou-fall a-vil-vern dre ma vez dilezet gant an holl ha dre ma ne vez hogozik den ebet o komz outañ ken-nebeut. Krog e vez da vogañ soñjoù du en e zigenez... Dre an istor-se e klasko ar filmaozer displegañ orin ar feulster, dre lakaat achanoimp d'en em soñjal ha d'en em c'houllenn hag-eñ ne vefe ket an diouer a eskemmoù dre gomz, e kement yezh zo ar bed, pennabeg ar feulster er c'hevredigezhioù a-vremañ...

Samuel Julien

An Amerikaned e Brest 1917-1919

Porched antre kamp amerikan Pontanezen.



E dibenn ar Brezel Bed kentañ e tilestras hogozik 800 000 soudard amerikan e Brest. Bras e voe al levezon war ar vuhez e kêr hag er porzh. Laouen gant an estren en deoù, e startaio an darempredoù pa zistroio ar bagadoù eus an talbenn, pa vo ret degemer etre 10 000 ha 25 000 den e-korf pep sizhun. Kresk war ar prizioù, laeroñsioù, trafikoù a bep seurt, gastaouerezh... Daoust da se e voe kemmoù bras e Brest, disheñvel an dremm anezhi abalamour da vezañs luoz an eotr Sam.

disklêriet eo ar brezel da Alamagn gant ar Stadoù-Unanet d'ar 6 a viz Ebrel 1917. Deraouañ a ra ar bagadoù soudarded da zegouezhout e Brest e miz Du 1917. Meur a gamp a voe aozet evito evel hini ar Forestoù e Sant-Mark ha dreist-holl Pontanezen, anvet *Ponty Camp* gant an Amerikaned. Klizet e vint e miz Kerzu 1919.

PERAK BREST ?

Ne oa ket anat an dibab. Evit gwir ez eo Sant-Nazer a oa bet choazet da gentañ. Ouzhpenn-se edo Brest pell diouzh an talbenn. Ne oa ket a-walc'h a gaeoù zoken evit dilestrañ. An abegoù douaroniel eo o deus choaritet. Ur vorlenn vras gant ur vorlenn-goudor, anezhi ur gwir borzh diabarzh gwarezet diouzh ar gwallamzer, gant ur c'halandour don a-walc'h evit degemer listri bras a-hed an devezh. Hag ivez bezañ an hent berrañ etre Amerika hag Europa.

Chom a rae pep tra da ober koulskoude. Hag e-korf daou vloaz e voe porzh ha kêr treuzfurmet don gant ar postadurioù a voe ret kas da benn : kampoù soudarded a-veet-mat, kaeoù nevez, hentoù-houarn, givri-houarn bras, stankelloù evit kaout dour mat da evañ evel hini Kerleger a vez implijet c'hoazh bremañ, pompaoù, hen-

toù terduet evit an tangirri, tredanvaoù, ur bon kirri-nij...

Ne veze ket gwelet mat an emastenn-se gant ar penadurezhioù gall. Reuz a voe zoken. Neozh, buan e voe lezet an Amerikaned da aozañ o aferioù diouzh o doare ha gant o zud. N'o doa ket gwali fiziñs e koskor an Arsanall hag e micherourien an embregerezhioù lechel...

PONTY CAMP

Ne oa ket tonket Pontanezen da vout ar brasañ kamp soudarded amerikan. E-kreiz 1918 evelato pa voe dispaket a-zevri al luoz amerikan e Frañs, e voe santet an ezhomm da gaout ur champ bras. Padal, e Pontanezen a oa er-maez eus kêr, e oa plas. Neuze e voe ledanaet ar c'kamp betek tizhout 687 hektarad, savet 850 savadur ha staliet miladoù da deltennoù. En holl d'an holl e c'hellid lojañ 80 000 den ! Aozet pizh pep tra evit aezamant ar soudarded : c'hwerek keurenn gant pep a gegin hag a breva, meur a sinema, tachennoù sport, salioù evit ar sonadegoù hag all. Ar pep heverkañ, moarvat, a voe an *duckboards*, an trantelloù, implijet evit tremen hep bezañ bourdet el lagenn - ne oa ket tu da gentañ da vale er c'kamp goude glaveier an diskaramzer. Mennozh ar jeneral Butler e oa, bet lakaez e penn ar

c'kamp. Ur beg bras anezhañ, pa welas ne oa netra d'c'hortoz digant ar melestradur, e tivizas ober ur gweled trumm e-barzh etrepaoez an arme e porzh Brest gant e soudarded da bakañ an trantelloù ! Diwar neuze e voe kempenn ar vuhez er c'kamp ha poent e oa, rak oc'h ober e reuz edo ar grip spagnat e-touez ar soudarded.

DAREMPREDOÙ FORC'HELLEK

Er penn kentañ e voe mat an darempredoù gant Brestiz ha Brestadeged... Labour a oa evit an embregerezhioù hag an dud prevez, da sevel barakennoù, boueta ar soudarded, koueziañ an dilhad... Etre 1 500 ha 1 800 den eus ar vro a veze o labourat evit ar soudarded er c'kamp. O vezañ ma oa paet ur soudard amerikan triwech gwech muioch eget ur soudard gall e kreskas buan ar prizioù, evel re an amann, ar vioù hag al laezh. Tra ma veze an dud ordinal o viziñ gant an naon e kreske a bep seurt trafikerezh e kêr hag en-dro d'ar c'kampoù. Daoust d'an diferadoù a-berzh ar lañs pe an tiez-kêr, a glaske terriñ lañs ar gastaouerezh, e tigare dizehan tavarnioù born e Gouenoù hag e Lambezelleg tro-dro d'ar c'kamp. Etre miz Mae ha miz Du 1919 e nivered 752 degouezh a gontamerezh gwenerel.



Gedienet e kamp Pontanezen, gant an *duckboards* (trantelloù) ouzh al leur.
sk. Orléans Historical Archives (at) Museum of Health & Medicine (OTIS Archive 1)

Un darn eus soudarded du an Harlem Hellfighters, aet ar C'roaz de Guerre ganto.

Plijout a rae d'ar soudarded c'hoari o "chow-boyes" gant o armoù. E-barzh un ispiserezh e Lambezelleg e laerjont rom dindan gourdroz ur revolver, kent bout harzet gant ar ged. Gwashoc'h c'hoazh un tammig diwezhatoc'h, pa laerjont kefiad ur c'hafedi : lazhèt ur vaouez yaouank ha tri den all gjozet.

Darempredoù hegaratoc'h a voe ivez avat, evel un niver bras a zimezioù "kenmesk". Gouzout a reer ez eus bet ouzhpenn daou vil maouez ha daou c'hant bugel a lestras war-zu ar Stadoù-Unanet etre miz Mae ha miz Kerzu 1919.

DONEDIGEZH AR JAZZ EN EUROPA

E Brest eo e teraozas remzad ar jazz en Europa. D'an 27 a viz Kerzu 1917, kerkent ha dilestret, e voe aozet ur sonadeg gant James Reese Europe (e anv gwir !), e penn e orkestra, 60 soner e-barzh. Skodeget e chomas an arvesterien war ar c'hae : ne

voent ket evit anaout *La Marseillaise* ken divoutin ha diroget e oa an ton evit o divskouarn.

En 369th rejimant troadelen e oa ur bagad soudarded du. Dont a ray ar bagad-se da vezañ brudet evit e guriou, dindan an anv a *Harlem Hellfighters*, o teurel ar spouron-mesk ar soudarded alaman. Ne felle ket d'ar jeneral Pershing, e penn al luoz amerikan, implij ar re Zu en emgann. Setu int neuze e-barzh an arme c'hall ! Dindan gwask ar gouarnamant amerikan ne voent ket lezet da zibunañ e straedoù Pariz e fin ar brezel. Dont a raint a-benn evelkent da zibunañ war ar Pempet Ball e New York e miz C'hwevrer 1919, ouzh son an orkestra jazz, renet gant James Europe.

ROUDOÙ ER GOUDEBREZEL

Bennozh d'ar postadurioù amerikan e chellas ar porzh-brezel brasaat hag anvesaat, dre implij an avedadurioù savet gant an ijin amerikan, peurgetket en

dachenn anvet Lannion, e-lec'h m'emañ hiziv kalonenn ar Morlu gall e Brest. Bras e oa ivez ar stokoù dilhad pe kirri a chomas war al lec'h hag a voe ingalet er vro er bloavezhioù 1920. Tro-dro da blasenn Strasbourg edo kardi an arme amerikan. Eno eo en em stallas da c'houde ar c'harr-dioù evel Renault ha Citroën...

Kavout a reer anv eus ar prantad-se e-barzh meur a lev : *Va zamm buhez* gant Loeiz ar Floch, *Pindigezh ar paour* gant Goulven Jacq eus Plougastell. Met ar pep azonusañ eo moarvat danevell Aboezen, *Tumporell an ankoù*, e-barzh *Pirchir Kala-goañv* ma 'z eus meneg eus Pontanezen.

Fulup Lannuzel

Azonus : arouezius.
Gwenerel : (db ar c'hlier'vedoù) a zastumer diwar darempredoù rev.
Kalandour : hed a-bom zo etre kein ar vag ha gorre an dour (trant d'evr e galleg).
Luoz (b) : lu, arme.
Pompa : savlec'h-pompañ

Evit mont pelloc'h :

- 1917, *Les troupes de l'oncle Sam débarquent à Brest*, embannet e *Les Cahiers de l'histoire*, niv. 225 (2017).
- 1917-1919, *Brest ville américaine*, CRBG (2019).
- 14-18, *La vie, la guerre, les américains à Brest 1918-1919* gant Marcel Hervé, div levrenn (2015, 2017).
- Koroll an dasorc'h* gant Fulup Lannuzel, da vezañ embannet en *Al Liamm* en diskaramzer 2019.

Le Guibra, un davarn etre labourerezh-douar ha sevenadur



Le Guibra, petra ar varn a c'hell bezañ an dra-se 'ta ? Sed aze un dra bennak all ! Pennad zo emañ paotred ha maouezed Le Guibra war deod an dud dre bevar c'horn ar vro, sur eo ha n'eo ket marteze ! Petra zo 'ta ahont e Sant-Suleg-ar-C'hoad ? Un abati zo, un iliz, ur c'hloz-iliz zoken, hag ur c'hrañj kozh, kaer-kenañ anezhi, hag e-touez koshañ tiez pri-prad a c'heller gwelet e Bro Roazhon,

mar plij ! Met n'eo ket d'ober hor fri-furch omp deut aze e-giz-se hiziv. Tomm eo an amzer, tomm-gor zokenoc'h, ha c'hwec'h vat ar bier zo ahont er Guibra-se. Deomp e-barzh 'ta da welet ha peadra zo da derriñ hor seched !

Kentañ tra da welet a-raok mont e-barzh eo moger-dal an ti, kaer-kenañ ar panelerezh staget outi : *Le Guibra, bar, épicerie, resto*. Alato ! Sed aze petra eo 'ta ! Un ostaleri ouzhpenn ! Ya, nemet amañ eo an hini nemeti a chom er gumun. Hag an dra-se 'vat, ur gumun hep ostaleri, ne c'hell ket bezañ, nemet marv e vefe honnezh ar gumun-se ! Ha barr an ti neuze, skeudenn ur c'houblad dañserien anezhañ, Petra zo kaoz 'ta ? Ma, deomp da welet François hag a zo hiziv o talcher an ostaleri. Setu digoret an nor, ur c'hamed e-barzh, digoromp hon daoulagad. Sellit 'ta, tudoù kaezh ! Taol-gor e penn uhelañ an ti, boutailhoù leun war an estajerennoù, gwer a bep ment hag a bep liv, bier diouzh ar wask, prest ha fresk, hag e penn traoñ an ti, taolioù, kadorioù hag ur siminal gozh. Treustier en nech e-giz gwechall, kempennet brav eo al lech, sur se. Entu ti all d'ar pezh emañ an ispisiri. Ale

François, unan eus ostaleri Le Guibra.

DAÑS AN UHELVARR DASTUMET A-VRIADOÙ

"Le Guibra" a vije bet ur gouel gwechall, ur wech ar bloaz. D'ar poent-se ez se an dud da zastum uhelvar, hag a-vriadoù neuze, achalese an anv *Le Guibra*, da lavaret eo *le gui*, an uhelvar, dastumet *à bras*, a-vriadoù ! Hag e-doug ar gouel-se e veze dañset un dañs. Pehini 'ta ? *Ar guibra* just a-walch, un doare dañs aeroplan anezhañ, evit an dud anaoudek, ur gwaz asambles gant ur vaouez o korvigellañ o chorfoù : tri c'hamed war-raok hag ur soubilg d'o chorfoù en a-dreñv. Achalese barr an ti, outañ ur c'houblad o tañsal ar *guibra*. Pegen brav panelerezh ar stal, bet graet gant tud eus ar vro : gant Lucie Baudoin eo bet treset, gant Fabrice Hameau, houarnier

arzel diouzh e vicher e Herzieg-Liverieg, eo bet gouellet, ha gant Réjane Le Chat, kizellerez war vein, arem, gwer, houarn, ha pri-prad e Sant-Suleg-ar-C'hoad, eo bet kizellet. Ken kaer eo panelerezh moger-dal an ti m'eo bet saludet war an ton bras gant Arkitekourien Savadurioù Frañs.

Ma, barrek omp bremañ pa ouezomp doare anv an ostaleri-ispisiri-preti-se ! Met lavar din 'ta François, pet den a labour amañ e-giz-mañ ? O, un daou-ugent bennak emezhañ din-me ! Alato, ne c'hell ket bezañ an dra-se ! Penaos an diaoul ? Sed aze penaos 'ta.

STAL EBET KEN ER BOURK

Un tamm zo e oa bet lakaet an alchwezh dindan an nor gant ar re a zalche ostaleri aze e-giz-se e-kreiz ar bourk. An Ti-kêr ne oa ket evit krediñ ne vefe stal ebet ken er gumun. Setu ma oa bet prenet honnezh gantañ e 2016, ha lañset ur galv da grinigoù, ur galv hag a oa bet a veg da veg



© Benaed Vernon

e-touez maread a dud a-raok pilat e-barzh divskouarn Elise Guillard, legumajerez diouzh he micher homañ. Ha galv ar gumun ne oa ket kouezhet war al leur, nann da ! Galvet he c'hamaladed gant d'he vro, leuniet ganto an teulad, raktresoù hag all, ha setu aet ar maout ganto. Ober a rafent war-dro ar stal, ha kumun Sant-Suleg-ar-C'hoad a chomfe perc'henn d'ar mogerioù. Hag an holl da gregiñ e-barzh. Labourioù graet gant an Ti-kêr, d'ar strollad kamaladed da zalcher kenwerzh, ha da zegas buhez a-nevez e-kreiz ar bourk.

PEMP LABOURER


Setu ma oa bet savet ur gevredigezh lezenn 1901 ganto, dezhi ur pal kenwerzhel avat, hag an dra-se zo kaoz ez eus kemend-all a dud perzh er jeu-se. Un daou-ugent bennak, yañ, met pemp a labourad da vat en ostaleri, evit tri fost kevatal implij leun-amzer. Lod a ra war-dro an ostaleri, lod war-dro an ispisiri, lod war-dro ar preti, ha lod all war-dro al luskañ sevenadurel. Ha da bep hini da beuriñ war e dachenn.

Anat deoch, evit an ispisiri e vez degaset hag gwerzhet legumaj diouzh ar vro tro-war-dro, rak savet-taer eo ar gevredigezh a-enep al labourerezh-douar fonnus hag an dasparzherezh bras. Legumaj ha gik

eus ar vro, evit tud ar vro, kulturez dezho da vont d'ar c'hreizennoù-kenwerzh bras dre an hentoù bras. Ekonomiezh lec'hel, buhez lec'hel, gwarezñ an douar, an dour, ar gwez hag al laboused, sed aze petra zo war o spered d'an dud yaouank-se. Betek 55 % diouzh ar boued a vez gwerzhet ganto a vez degaset diouzh ul c'helchriad a dregont kilometr a dro-war-dro. Ha labourerien-douar ar vro a gav er *Guibra* ul lec'h-kaer koulz evit gwerzhañ o fro-dioù hag evit eskemm o mennozhioù war o raktresoù hag ar pezh a c'hellent ober an eil re asambles gant ar re all. Setu ma'z eus en em lakaet unan nevez zo d'aozhañ formaj-laezh-saout. Ha berzh a ra 'toare ! Er mod-se e vez degaset nerzh ha brud vat d'ar gumun, ha bev e chom !

BIRVILH, DUDI, PLIJADUR

Rak ouzhpenn bezañ ul lec'h-kenwerzh, bez' eo ar *Guibra* ul lec'h birvidik, dudius, plijadurus, buhezkaet gant hag evit an dud zo o chom en trowardroioù. Digor eo d'an holl, d'ar re vras koulz ha d'ar re vunut, choant ganto ober un dra bennak evit o chumun, ul lec'h evit kaozeal, tabatal, eskemm ha sevel raktresoù. Setu perak e vez aozet a bep seurt abadennoù : sondegoù, arvestoù, diskouezadegoù, atalieroù a-vil-vern, bep miz hag e-pad ar



Sonskrif ton Le Guibra.

bloaz. Ebaoù e-leizh a vez, n'eo ket bep noz e-giz e Kêr Iz, met alies neuze 'ta da vihanañ atav ! Ha tro-gaer da dud ar vro d'en em anaout gwelloc'h. E-touez an atalieroù kinniget er *Guibra* e c'heller gwelet "Anglo-Apéro". Hervez kont ez eus ur pemp pe chwech familh bennak diouzh ar Vro-Saoz o chom er gumun, ha ganto e oa bet savet an atelier-se a zo kresket bremañ ha digor d'an holl re a gar kaozeal yezh Shakespeare, pe tatoùllat anezhi hepken.

Estreget an dra-se zo. Sed aze ar pezh en deus lavaret François din e pleg va skouarn : un atelier "kaozeadennoù e brezhoneg" a vo savet ivez azalek miz Gwengolo kentañ a zeu, diwar goulenn tud eus ar vro. Peadra aze da laouenaat Yann Vreizhad, banne bier, chistr, chouchnn hag all da-heul ! Deuit 'ta d'ar *Guibra* da storlok at ho kennoù e yezh Molière, Shakespeare pe... Pêr-jakez Heliaz.

Benaed Vernon
Le Guibra, 18 strada ar C'hrañj/rua de la Grange,
35250 Sant-Suleg-ar-C'hoad. Lec'henn internet :
<http://leguibra.fr>

Div yezh, div skol, diouer a sevenadur



Plassen kreiz-kêr Bruz.
E miz Meurzh e oa. D'ar c'hentañ a viz Meurzh evit bezañ resisoc'h. Abadenn ar Prizioù a oa bet filmet war an ton bras ha skignet gant France 3 an deiz war-lerc'h, evit diskouez pegen prizioù eo ar brezhoneg. Leun-chouk e oa sal ar Grand Logis. Enoret e oa bet kumun Bruz diwar-bouez labour ar gevredigezh Bruzhoneg, d'ar skol bublik divyezhek, d'ar c'hlasoù divyezhek nevez digoret er skolaj publik ha d'ar strivoù dre vras a-berzh an Ti-kêr. Daoust da se...

e miz Mae e oa. D'an eil a viz Mae evit chom resis. E kêr Bruz c'hoazh rak nepell diouzh ar Grand Logis ma oa bet dalc'het abadenn 2019 ar Prizioù emañ ar skol bublik divyezhek. Resisaat a rankan c'hoazh. A bouez eo : er skol bublik ma 'z eus klasoù divyezhek enni. Taolet eo bet ar gerioù-mañ ouzh ma mab : "sala breton". Siwazh dezhañ, n'eo ket ar wech kentañ, siwazh d'ar skol, rak meur a vugel o deus distaget seurt gerioù. Siwazh deomp holl c'hoazh, peogwir ez eus bet taolet seurt gerioù ouzh e gilasad a-bezh, pe dost.

➤ DIV YEZH PE DIV SKOL ?
Keienn e div yezh, sed aze ar mennozh. Lakaat ar brezhoneg hag ar galleg da vezañ par e mod pe vod, er memes skol. Div yezh met ur skol nemetken. Ar pezh a dalvez e tlefe an divyezhegezh bezañ afer ar skol en he fezh hag e rankfe

kement "skol divyezhek" lakaat er pleustr ur mont en-dro d'isheñvel diouzh hini ar skolioù divrezhonek. Graet e vez e lec'hioù zo gant ur tañva d'ar brezhoneg kinniget d'an holl da skouer, ha c'hoant zo gant Kuzul-departamant Penn-ar-Bed da lakaat kement-se da reolenn skouer. Aesaet e vez ar c'helenn brezhoneg a-benn neuze ha plaeñoch an darempredoù etre an holl ivez. Ne vez ket graet seurt strivoù e pep lec'h avat hag e-lec'h klevet div yezh e vez disrannet ar skol e div skol tamm-ha-tamm : hini "ar Vretoned" hag hini "ar Challaoued". Hag an enebiezh da-heul.

➤ ENEBIEZH DIABARZH
N'eo ket seurt enebiezh etre an div "skol" ur dra nevez, pell a-chann. Kevezerezh a vez kenetreze. Anat e vez d'ar vistri-skol : en arvar e vez ar postoù labour divrezhonek pa vez ar re divyezhek o vont war gresk, el lec'hioù ma chom stabil pe ma

tigresk an niver a vugale dreist-holl. Mat e vez d'an holl peurvuañ diorren ar c'hlasoù divyezhek pa vez anv a greskiñ an niver a vugale er skol, met seul vuioch a skolidi gollet, seul vrasoc'h an enebiezh etre ar vistri-skol a chom enni.

Mont a ra pelloc'h an enebiezh a-wechoù. Ur c'hevazerezh ouzhpenn a c'hell dispakañ etre ar strolladoù kerent bodet er skol. Allies-mat, pa vez savet ur gevredigezh tud skolidi Div Yezh e c'hall en em gavout e kevezerezh gant kevredigezhioù all, pa vefe Kevread Kuzulioù tud ar skolidi (FCPE) pe re all, da vare an dilennadegoù-skol. Kenlabour a vez kenetreze war danvezioù zo gwir eo, met bezañ ar gevredigezh Div Yezh a vez gwelet evel ur c'hevazerezh ouzhpenn ivez.

➤ DEGEMERET MAT EN UR SKOL BLIJUS
Erru ma mab er skol Jacques Prévert, ma 'z eus klasoù divyezhek, hogozik daou



Daoust da skolioù zo bodañ klasoù brezhoneg-galleg ha klasoù galleg rik, un dispartl spartan a c'hell bezañ etre ar vugale hag o zud eus an daou hentad.

vloaz zo bremañ. Mat-tre eo bet an degemer ha plijet he deus ar skol-se dezhañ diouzhtu. An endro, ar boued hag ar savadur kempennet brav a oa plijus dezhañ, betek an diwallerzh zoken. Mankout a rae e vignoned kozh dezhañ met n'eo ket bet pell o kaout mignoned all. Dindan berr amzer e oa en em santet evel pa vije bet deskard er skol-se a-viskoazh, hag eñ da vezañ pedet emañ hag ahont da vont da festoù deiz-ha-bloaz e vignoned skol. Ur skol e oa en e spered, hag unan nemetken.


Nemañ ket kennebeut all e-touesk ar re a wisk T-shirtoù mod breizhek pe ar re a embann "Breton ha lorc'h ennon". Pepsun ebet ouzh ma c'harr. N'eo ket breton anv ma mab zoken ha ne vez klevet nemet galleg er porzh-skol. Ma ne vije ket bet eus ur skritell bennak gant Div Yezh - e-mesk re all - e-tal dor ar skol, ne vije bet merzet gant den ebet bezañ ar c'helenn divyezhek. Ur skol

nemetken war ziskouez, met div skol e seblant bezañ e penn forzhik a dud e gwirionez.

➤ KUNJENNOÙ GOUENNELOUR ?
Kunujennet eo bet eñ, ma mab, ha bugale all eus e gilasad gant ar gerioù "sala breton" ha gerioù all damheñvel. Bugale zo o deus bet c'hoant da skeiñ gantañ zoken. Kaset ar c'heloù dimp war-eeun a-berzh ar skol ha galvet e oamp bet, e vamm ha me, gant ur gasourez. Embannet he doa honnezh e oa bet hor mab gwazh a ouennelouriezh ("victime de racisme" en he gerioù dezhi). Kadarnaet ar varn gant tud bugale all eus ar skol, en o zouesk e oa tud du. Anavezout mat a reont, siwazh, seurt gerioù pe emzañchioù a denn d'ar ouennelouriezh. Sioulaet an traoù dibaoe, daoust ma vez un heklebennak c'hoazh ur wech dre vare...

➤ DIV SKOL PE DIOUER A SEVENADUR ?
N'eo ket deuet ar gerioù "sala breton" dre zegouezh e genoù bugale zo, avat. Lakaet int bet en o genoù gant unan bennak. Lakaet int bet gant ar re a c'housañv ar c'hevazerezh, gant ar re spontet evit o amzer-da-zont a c'hallfe bezañ en arvar hervezo abalamour d'ar brezhoneg er skol. An darn vrasañ eus tud ar skol ne reont ket van eus ar brezhoneg, e-giz na vefe klas divyezhek ebet er skol. Diseblant int ha mat pell zo. N'eus netra da cheñch hervezo, netra da zisplegañ, netra da lavaret d'ar vugale all. Padal, an enebiezh hag ar ouennelouriezh a zeu allies diwar an diouer a anaoudegezh dre vras, siwazh deomp holl. Un diouer a anaoudegezh eus o identelezh, eus o istor, eus o bro e gwirionez, rak Bretoned int kement ha ma mab, siwazh dezho...
Samuel Julien

Geriafurch pe unaniñ ar geriadurioù



Abaoc ar bloavezh 2018 e kaver er Genrouedad ar c'henstroller geriadurioù anvet Geriafurch, savet gant Anthony Lannuzel, ezel eus Poellgor Bed Niverel' (PBN).

Ur c'henstroller geriadurioù eo *Geriafurch* hag a ginnig d'an implijerien mont da furchal e-barzh geriadurioù war ar brezhoneg liesseurt paliou disheñvel dezho. E-se e c'hellomp en em choulenn ha ne vefe ket tremenet koulz ar geriadurioù a-strew, ha deuet mare an unaniñ ?

AL LEC'HIENN EN HE-UNAN

Brav eo al lec'hienn internet, eun hag aes-kenañ ober ganti. Daou stumm zo dezhi, ur stumm e brezhoneg hag un eil e galleg, ar pezh zo un dra vat. Delyth Prys Jones, kelenner eus Bangor e Kembre, he deus embannet : *"Ret eo kaoz pep meziant, ardaed hegerz er yezh vras hag er yezh vunut, m'emeur en ur vro diyezhek ma vez diglozsiñ."*

ROLL AR GERIADURIOÙ

Renket e vez ar geriadurioù dre urzh al lizherennoù. Dre vras, pa glasker ur ger galleg > brezhoneg e vez disoc'hoù ar geriadurioù-se renket dre an urzh-skrammañ : *Favereau, Glosbe, Preder, TermOfis*.

Penaos kavout Geriafurch ?

Meur a hent zo evit kavout lec'hienn Geriafurch :

- Skrivañ "Geriafurch" en ul lusk er enklask, ne vern pehini.
- Skrivañ an URLioù-mañ e-barzh barrenn ar chomlec'hioù : <https://geriafurch.bzh/fr> pe <https://geriafurch.bzh/br>
- Mont war Lexilogos ha klask "Geriafurch" da c'houde.

Pa reer en tu kontrol, brezhoneg > galleg, e vez kavet an disoc'hoù dre an urzh-mañ : *Favereau, Devri, Glosbe, TermOfis*. Kavout a reer neuze dre vras peder geriaoueg disheñvel o hentenn : unan troet war ar yezh skiantel ha teknikel rik (stank enni an termennoù dibaot), un eil troet war brezhoneg ar pemdez (unan "pobl" war a c'heller soñjal), un trede hini muioc'h diouz an ezhommoù micherel hag ur pevare troet war istor ar yezh.

ARC'HVELADURIOÙ OUZHPENN

Anthony Lannuzel, hag ar skipailh zo gantañ o deus laeket en o soñj diorren un nebeud archweladurioù all. Kinnig a reont unan evit treuzfurmiañ an niveroù e lizherennoù, unan all gant mont en-dro ar c'hemmadurioù en un doare simpl. Neus ket kelt-se ez eus bet kinniget un archweladur all evit kavout klotennoù (e-keñver ar skrivadur bepred) gant ar ger ho peus ebarzhet. Kenderc'hel a raio Anthony Lannuzel ha skipailh PBN da ouzhpennañ archweladurioù nevez hep mar ebet. Trugarez vras dezho evit o labour ramzel.

Pêr Morvan

Archweladurioù : archwel (labour, keñrid) kaset da benn gant ur reizhad sifenneg evit tizhout ur pal resis (functionality e saozneg, fonctionnalité e galleg).

1. Poellgor Bed Niverel zo ur stroll programmuerien, yezhonourien, kelennerien, stlennegourien, studieren savet er bloavezh 2017 diwar youl oberourien war an dachenn niverel. Ennañ e kaver izili eus Ofis Publik ar Brezhoneg hag An Drouzig, hag ivez tud n'emaint ket en aozadurioù-se.
2. Tinnel eus ar c'houarnid : *Ha difaziñ a ra LanguageTool ar c'hemmadurioù 7, p. 42, skrivet gant Pêr Morvan ha soutenet e 2019.*

Ur sell war Skol an Emsav en 10 vloaz tremenet

War an ton bras e vo lidet 50 vloaz Skol an Emsav e miz Here. Un hanter kantved gouestlet da gelenn ha da dreuzkas ar brezhoneg d'an dud deuet hag ivez da aozañ ar vuhez e brezhoneg e Roazhon. Ennon e oa bet fiziet ar garg rener Skol an Emsav tost dek vloaz zo ha c'hoant em boa da gontañ ar bloavezhioù-se da lennerien *Bremañ*, da zeskrivañ an emdroadur-se ha da reiñ ur sell war adperc'hennañ ar brezhoneg.



e 2007 e oa bet boulc'het gant ar stummadurioù c'hwec'h miz e Skol an Emsav. D'ar mare-se ne oa nemet Stumdi ha Roudour a ginnige seurt stummadurioù evit deskiñ brezhoneg, e Plañvour, Landerne ha Karaez. Lafset e oa bet ar stummadur hir kentañ e Roazhon gant trizek stajad er strollad, etre miz Genver ha miz Mezheven 2007.

UL LAMM WAR-RAOK WAR DACHENN AR STUMMADURIOÙ HIR

Daouzek vloaz war-lerc'h eo bet tric'hemmet an niver a stajidi hag al lec'hioù stummañ ivez. E Roazhon hag ivez e div eus peder c'hêr brasañ Breizh : Naoned (Sant-Ervlan) ha Sant-Nazer abaoe ar bloaz-mañ. Estregret ar sifroù a ranker gwelc'h evel-just, ar bedagogiezh, an teknikoù kelenn zo aet kalz war-raok ivez e-korf dek vloaz ha gant binvioù nevez evel an diplom barregezh war ar yezh (DBY) e brezhoneg da skouer, hon eus ar c'hañs da gaoz un doare fetis da heuliañ al labour a vez kaset bemdez. Anat eo ivez eo gant an 40 vloavezh a labour kaset gant izili Skol an Emsav, a-raok na vefen rener, ez eus bet moaien da vezañ ken evedus war dachenn ar c'helenn. Ma'z eus lorch enomp gant ar stummadurioù aozet e Sant-Ervlan ha Sant-Nazer e chom luziet-tre c'hoazh. Gant skoazell Kuzul-rannvro Breizh e vez arc'hantaouet stummadurioù brezhoneg war un dachenn rannvroel all, hini "Broioù al Liger". Nach a ra Kuzul-rannvro "Broioù al Liger" arc'hantaouañ ar stummadurioù-se... Pa skrivañ "nach" ne ran nemet divinout e nachont rak e gwirionez ne fell ket dezho nach en un doare ofisiel ! Ne gredont ket zoken sammañ an divize-se. Ur gwallziforc'h gwir eo etre an dud a heull ur stummadur war ar brezhoneg e Roazhon, Sant-



A-us, stajidi stummadur hir kentañ Skol an Emsav, e 2007. Dindan, stajidi ar stummadurioù hir hag uhel e Roazhon, e 2019.

Brieg, Kemper hag ar re a ra kemend-all e Sant-Ervlan pe Sant-Nazer. An neb a ra ur stummadur micherel war n'eus forzh pe zarvez (mañsonerezh, ebenouriezh, kontouriezh, stlenngraferezh...) en deus ar gwir da gaoz ur skoazell argant, paeet gant Kuzul-rannvro lech annez ar stummadur, evit pourveziñ d'e ezhommoù pemdez pa ne gloc ket e saviad gant dezverkout frammoù all evel ar Pol Implij da skouer. An dra-se e vez laeket da davezoù evit ar stummadurioù war ar brezhoneg e rannvro "Breizh". Siwazh, n'eo ket gwir evit ar re a heull ar stummadur el Liger-Atlantel, rak ar stummadurioù ne vezont ket arc'hantaouet gant ar velestradurezh-se... Ha phon eus goulnet digant he dileuridi arc'hantaouañ ar stummadurioù e brezhoneg o deus nached reiñ ur respont. Na pegen cheuch ! Ha pegen start en em gavout "divouedet" evit an darnvez stajidi intereset gant hor yezh ha gant seurt stummadurioù. Setu unan eus heuliadoù eun an disparti etre Bro-Naoned hag ar peurrest eus Breizh. Dre c'hañs e asant Kuzul-rannvro Breizh, bep bloaz abaoe daou vloaz hag en un doare dreistordinal, kas un digoll da stajidi ar stummadurioù micherel war ar

brezhoneg el Liger-Atlantel. Un deiz bennak, pa vo sklaer an amzer, e c'hallimp stummañ kantadoù ha kantadoù a oadourien bep bloaz e Roazhon, Naoned, Sant-Nazer... ha Pariz ?

UR PREDER WAR AR C'HENTELIOÙ SIZHUNIEK

Kalz a dud o deus desket brezhoneg, ha kalz a vez o teskiñ brezhoneg bepred, dre ar c'hentelioù sizhuniek. C'hwil hoch-unan, a zo o lenn an tamm pennad-mañ, ho peus desket brezhoneg dre an hent-se marteze. Pouezus eo ar c'hentelioù-se evit kizidikaat, reiñ un taffva, mont pelloc'h, deskiñ lenn, komz... Abaoe 2007 ha krouidigezh ar stummadurioù hir eo bet cheñchet bzh en daboulin avat. Talvezout a ra ur bloavezh kentelioù sizhuniek, dre vras ha diouzh ar frammoù kelenn, 45 eurvezh brezhoneg. Ar pezh a zo nebeut-tre evit gallout deskiñ ur yezh, en un endro divrezhonek peurgetket. Ha stadañ a reomp eo diaesoc'h-diaesañ desachañ an dud da zeskiñ brezhoneg dre an hent-se. Gallout a rafec'h krediñ, ha me am boa kredet an dra-se pell zo, e vefe tud ar vugale skoliataet ar skolioù divyezhek pe dre soubidigezh ar re gentañ o lakaat o anv er c'hentelioù brezhoneg. Lod a ra met n'int ket gwall niverenn. Sellit 'ta, ouzhpenn 800 bugel zo er skolioù-se e Roazhon, peadra da leuniañ ar c'hentelioù brezhoneg ! Met n'eo ket mod-se e tremen an traoù, hag an abegoù roet zo liesseurt : re ziwec'hat eo, deskiñ ur yezh d'an oad-se a vez start-tre, diouer a amzer, diouer a interest, diouer a choant, hag ivez e lenner aliesoc'h-aliesañ frazennoù evel "n'eo ket


rekis gouzout brezhoneg evit enskrivañ ho pugel en ur c'hlas divyezhek". Gwir eo n'eo ket ur redi met un tamm mat poellekoc'h e vefe, kredapl. Aesoc'h ha plijusoc'h evit ar vugale eo e vefe lennet, gwelet ha klevet un tamm brezhoneg ur wech echu an devezh skol. Yac'husoc'h ha pozitiveloc'h evit dazont hor yezh e vefe ivez broudañ tud ar vugale da lakaat o anv er c'hentelioù brezhoneg pa enskrivoù o c'hrouadurien en ur skol vrezhonek.

Daoust da se eo ret derc'hel da gaout spi ha da labourat war an dachenn-se rak bep bloaz e teu tud nevez da lakaat o anv er c'hentelioù brezhoneg, tud yaouank ha kozh, merc'hed ha paotred, tud eus Breizh pe eus lech all. Gwech ha gwech all e teu tud d'ar c'hentelioù sizhuniek evit ober anaoudegezh gant ar brezhoneg hag evit mont buanoc'h ha pelloc'h ganti e lakaont o anv en ur stummadur hir, d'an daouallam. Pa stader an dra-se e challer lavarout omp bet trec'h !

EMBANN BREZHONEG, BEVAÑ E BREZHONEG, OBER GANT AR BREZHONEG

E 1980, 39 vloaz zo, e oa bet embannet gant Skol an Emsav niverenn 0 *Bremañ* hag en ho taouarn emañ an niverenn 427. Pa oa bet bouchet avantur *Bremañ* ne oa, koulz lavaret, kelaouenn vrezhoneg ebet. "Kazetenn ar stourmoù e Breizh" e oa he istil d'ar c'houlz-se. E 2014 pa oa bet gant choar vihan *Bremañ*, *Brezhoneg*, e oa bet divizet ivez cheñch lusk ar gelaouenn hag embann un niverenn bep daou viz. Ur gelaouenn a-feson eo *Bremañ* gant pennadoù a galite hag ul live brezhoneg uhel. Labourus-tre eo embann *Bremañ* ha stadet hon eus eo cheñchet kalz bed ar c'helaouñ dre vras, e brezhoneg hag er yezhoù all. Pa weler ez eus kelaouennoù zo e Breizh hag a ya da get goude nav

Niverenn 1 Brezhoneg, viz Genver-miz C'hwevrer 2014.



niverenn e challer bezañ prederiet gant dazont ar c'helaouennoù paper. Pouezus eo derc'hel kelaouennoù paper e brezhoneg, met betek peseurt koust, evit peseurt lennerien, gant peseurt pal ? Da seurt goulennoù e rankimp respont er bloavezhioù da zont. Ur seblant respont d'ar goulennoù-se eo *Brezhoneg* pa oa bet lañset e 2014. Dav e oa da Skol an Emsav krouiñ ur gelaouenn a glot gant al lod vrasañ eus hec'h izili : an deskidi. Er bloavezhioù 1980 ha 1990 e veze embannet *Evit ar brezhoneg* gouestlet d'an deskidi, just a-walc'h. Un ugent vloaz ben-nak war-lerc'h hor boa soñjet e oa un ezhomm bepred evit seurt kelaouenn ha savet e oa bet *Brezhoneg*.

Lakaat ar brezhoneg da vevañ eo pal pennañ Skol an Emsav hag an embann, kelenn ar yezh zo ahelioù stourm ha labour. Estreget an ahelioù-se zo. Se zo kaoz e klask Skol an Emsav lijañ hag azañ obererezhioù e brezhoneg ; komz eus levrioù e brezhoneg gant ar bodad "Lenn a-stroll", mont d'ar sinema ha breutaat e brezhoneg diwar-benn ar film gant "Klub filmoù", prenañ legumaj bio ha lec'hel bep sizhun ha deskiñ keginañ e brezhoneg gant ar "Paneradoù legumaj", mont da levraroueg Guy Allain d'ar



A-gleiz, staj dre soubidigezh Skol an Emsav aozet e Kernaskledenn. A-zehoù, savadur Skol an Emsav e-kreiz kêr Roazhon, abaoe bloaz.

Merc'her hag amprestañ ul levr pe ur gelaouenn e brezhoneg, heuliañ kentelioù sizhuniek yoga e brezhoneg, kas un nozvezh d'ar Gwener o vrezhonegañ tro-dro d'ur banne gant "Tavarn vrezhonek", mont da foetañ bro da Gernaskledenn pe da Sant-Maloù ha komz brezhoneg a-hed an deiz ! Setu un alberz eus an traoù aozet e brezhoneg evit ar vrezhonegerien pe an deskidi.

ADPERC'HENNAÑ HOR YEZH

E kalon hag e genennoù Skol an Emsav emañ argerzh adperc'hennañ ar brezhoneg. Mont a rafen pelloc'h c'hoazh. Stadet em eus e oa bet troet strategiezh an "emsav brezhonek" war-zu ar c'helenn divyezhek ha dre soubidigezh e-korf an daou-ugent vloaz tremenet. Anat eo ez eus bet graet ul labour ret ha diazez evit ar brezhoneg hag evit adperc'hennañ ar brezhoneg. Ne c'hallimp ket saveteiñ hor yezh dre ar skolioù nemetek avat, diouzh un tu peogwir n'eo ket sur e komzo brezhoneg an holl 18500 bugel skoliataet er skolioù brezhonek ha diouzh un tu all abalamour ma stader amañ e Skol an

Emsav, er c'hreizennoù stummañ all, e komz brezhoneg al lodenn vrasañ eus an holl oadourien a ouest c'hwec'h pe nav miz eus o buhez da zeskiñ brezhoneg da skouer. O dibab e oa, strivet o deus, poaniet o deus alies-mat ha n'int ket prest da lezel disoc'h al labour-se da goll. Gouzout a ouzont ivez eo hir ha start an hent evit deskiñ hag ober gant ur yezh yac'h ha reizh met prest e vezont peurliesañ da vont ganti. Anat eo neuze e ranker kaout an eil, ar vugale, hag egile, an dud deuet. Penaos e challer lezel da badout un digempouez ken bras etre an archant gouestlet d'ar c'helenn er skolioù hag an archant gouestlet d'ar c'helenn d'an dud deuet ha lezel neuze un digempouez ken bras all e sifroù an enskrivadurioù ? Rak-se e rank Breizhiz kompren ar splot da zeskiñ ha da ober gant ar brezhoneg evito o-unan. Dav e vo lakaat sklaer d'an holl ne c'haller ket kentañ war ar vugale nemetek evit saveteiñ hor yezh. Er stern-se oa bet embannet e 2017 gant ar gevredigezh DAO ar steuñv anvet *War zu ur gevredigezh divyezhek e fin an XXI^{vet} kantved*. Rak an dra-se eo ar pal, kaout ur gevredigezh divyezhek. Gant an



Paneradoù legumaj a vez kavet bep sizhun e Skol an Emsav.

ensavadurioù emañ an tu-kreñv evit kenderc'hliñ ar boblañs da zeskiñ brezhoneg. Bep miz, bep sizhun, bemdez e tlefe pep Breizhad ha Breizhadez bezañ tizhet gant koulzadoù brudañ bras evit brudañ ar brezhoneg, evit lakaat an dud da gaout choant da zeskiñ brezhoneg, da santout an ezhomm da zeskiñ brezhoneg. Kenderc'hel a raio Skol an Emsav da gelenn brezhoneg ha da dreuzkas ar yezh en 50 vloaz da zont. Hogen, ma chomomp gant ar memes lusk pe gant ar memes niver a dud o teskiñ bep bloaz e teulo abred pe abretoc'h ar brezhoneg da vezañ yezh ur c'hilann pe gwashoc'h c'hoazh, yezh ur seurt sektenn. An holl achanomp, tud, kevredigezhioù, a vo akord evit lavarout n'eus ket amzer da goll ma fell da bobl Vreizh e teufe ar brezhoneg da vezañ yezh ar gevredigezh en-dro.

Gwernael Jéquel



Istor Skol an Emsav : peadra da lenn ha da selaou

Deroù ar gevredigezh, korlet gant tud hag a oa e-kreiz ar jeu d'ar c'houlz-se, sed ar pezh a c'hellit klevet ha lenn, dre Radio Kreiz Breizh hag al lec'hien gelaouñ *Dispak*. Da gentañ, un hir a bernad-kaoz gant Lukian Kergoat ha Lena Louarn, enrollet da-gerver div abadenn *Pikousoù Dibikousoù*, gant Tomaz Laken hag Enora Molac. Skignet e oant bet e miz Mae hag e miz Mezheven tremen, diwar-benn 50 vloaz Skol an Emsav. Dre lec'hien internet Radio Breizh e c'hellit selaou pe adselaoù o c'hromzoù. Da eil, ur pennad-kaoz Ionnus gant Lukian Kergoat diwar-benn krouidigezh ar gevredigezh, kaset da benn e 2014 gant Tomaz Laken. Embannet eo bet dre skrid e div lodenn al lec'hien *Dispak*.

Evit gouzout hiroc'h : www.radiobreizh.bzh www.dispak.bzh

Oulpan, Deiziataer, Les 1 000 premiers mots en breton...

Rann an embann a oa bet savet pell zo e Skol an Emsav. Estreget ar gelaouenn *Bremañ* a oa bet lakaet embann. Levrioù evit ar vugale e oa bet savet ivez, evel *re Lom*, troet gant Mark Kerrain, pe levrioù bannoù-treset evel *Lucky Luke*. E-touez an embannadurioù brudetañ emañ bepred *Les 1 000 premiers mots en breton* kempennet gant Lukian Kergoat, teir levrenn *Oulpan* gant Nikolaz Davalan hag an *Deiziataer* hollvrezhonek.



Petra eo Skol an Emsav evidoc'h?

Goulennet hon eus ouzh un nebeud izili, a wechall hag a vremañ, ar soñjoù a zeu d'o spered pa glevont anv Skol an Emsav...

Olier ar Mogn

Skol an Emsav. Pa oan 16 vloaz, e 1975, em boa lakaet va anv evit heuliañ kentelioù noz e Roazhon. Desket em boa va-unan distripañ un tammig brezhoneg a-raok met kalz a draoù am boa da zeskiñ c'hoazh. Buan e teuas da stourm evit an disoù d'ra a oa a bouez evidon : adlakaat va broad en he frankiz dre ar brezhoneg ha stourm evit diktar ar gwalchoulec'h. Rannou a oa ivez e Skol an Emsav d'ar poent-se : rann ar c'helenner evel-just met ivez rann an diabarzh, rann an diavaez, rann an embann... Gant homañ e voen dedennet ha kas a rfa war-raok ar mennozh krouñ "kazetenn ar stourmoù e Breizh". *Bremañ* e voe anvet. War-dro ar gelaouenn em eus graet e-pad 33 bloaz, o kempenn ar pennadoù ingal bep miz, evel rener an embann un darn vat eus an amzer. Prezidant Skol an Emsav on bet ivez etre 2008 ha 2013, d'ur mare ma oa kemmet da vat dija evit dont da vezañ ur fann stummañ e Breizh-Uhel.



Brou e velle adembann ar pezh a oa skrid-diazev Skol an Emsav er bloazioù 1980. Setu un arroud : "Yezh pobl (Yezh eo ar brezhoneg, yezh ar bobl eo - daoust ma'z eo ar galleg yezh ul lodenn ivez. E vanve ar brezhoneg e vefe gwasketoc'h c'hoazh labourerien hor bro hag aesoc'h ober gouvid diwar o c'houst. Sed e soñj deomp eo ar brezhoneg ur benveg ret da vont enep hon distruj, da nac'h ha da ziskar ar sistem hon gwask ha da sevel pobl vreizh en he frankiz"... Dispredet, diamezet? Ne gav ket din. Cheñchet ar vro a-dra-sur met daoust ha n'eo ket bet divouedet, dibolbikelaet betek re ster an deskiñ brezhoneg?



Mich Beyer

Ur babig nevez-c'hlanet e oa Skol an Emsav pa 'm boa graet anaoudegezh ganti ! E 1972 e oa, ha ma o tistreiñ d'ar vro hag o lammat war gement digarez a oa da bezzeskiñ brezhoneg. Diouzhtu pa 'm boa klevet anv eus stajoù em boa lakaet ma anv. Gwalan, Kerbervez, Sant-Evarzeg, Mur... An degouezhioù nemeto ma c'hellen bevañ e brezhoneg e-pad eizhtez ha tro din ivez da gelañ ouzh tud all, kelennerien pe deskiñ, mennet da gas a bep seurt raktresoù war-raok. Ur gwir chidhouarniad o viriñ ! Ha pa soñjer, ne oa ket bet aner an eurvezhioù (nozvezhioù paurliesañ !) tremenet o hunvreal asambles pa soñjer e ganedigezh Diwan ha *Bremañ*, e Gouel ar Brezhoneg ha kement a draoù all, bev-mat bepred.

Annaig Kervella

Petra eo Skol an Emsav evidon ? Ul lodenn eus ma yaouankiz. Lusket mat, oberiant, liesseurt ha leun a spi. Devezhioù vakansoù tremenet e stajoù aozet e Bouvriag, Bulad, Gwerledan... Ur prantad kaer-tro chomet garanet don em eñvor : Gwengolo en Enez-Veur e 1973, e-tal ar mor e Bro-Dreger. Kentelioù-noz e Roazhon roet a youl vat e salioù iliz Keryann, goude koan da dud a bep seurt. Un doare da zeskiñ kelenn war an dachenn ha da wellaat ma brezhoneg-me ivez. Dibunañ dre straedoù kêrioù Breizh : Kemper, Karaez, an Oriant, Roazhon, Naoned pe c'hozh Sant-Nazer... Dispakañ hor youl, hor c'hoantoù, hor gwirioù evel tud ha Breizhiz. Sevel, kemer perzh ha kas war-raok oberiantizoù nevez. Gouel ar Brezhoneg adal 1974, Diwan e 1977, *Crash Course* kentelioù brezhoneg e Skol-veur Roazhon 2, ar pegsun "Nann d'an distruj nukleel"... Stourm. Mignonlezh. Glac'har. Yann-Kél, Gwengolo 1976. Ober anaoudegezh ganti a bep seurt tud, kenlabourat, eskemm, lenn ha bezañ fri-furch. Digeriñ ma spered war dachennoù diniver ha liesdoare dre ar gelaouenn *Bremañ*, ar c'heleier sizhuniek bet war ar rouedad ganti *Bremañ*. Ur prenest digor war ar bed, war dazont Mab ha Merc'h-den. Lakaat yezh ar vro da vleuniañ, da zispakañ, da vevañ ganti emgavioù evel reoù Lenn a-stroll. Skol an Emsav ? Un nezh start a vroud ac'hanon abaoe ar penn kentañ da gaout spi em bro hag em yezh a zo kalon dibar ul lodennig eus annezidi an Douar.



Nikolaz Davalan

Skol an Emsav (hervez Sant Nikolaz).

Ne 'm eus ket anavezet mareoù kentañ Skol An Emsav, ar bloazioù stourm moarvat. Ar skiant 'm eus-me prenet gant "SAE" he deus d'ober gant ar c'helenner brezhoneg evit an dud deuet dreist-holl. Mar menegit Skol an Emsav din e teu tri zra da 'm spered : ur mare, ar bloazioù 90, ul lec'h, straed Hoche, hag un den, Lena Louarn.



Ar bloazioù 90 : daet 'oan da Roazhon da chom e 1991 d'ober ma studioù. Goude bout bevet fin ar bloazioù 80, ma seblante ur bern traoù a denne da identelezh Breizh mont da skos, pe bout aet da gousket da vitanañ, em boa bet ar blijadur da welet an traoù o tihuniñ tamm-ha-tamm. Gram am boa kavet gwelet tud a-vil-vern, yaouankizoù alies, o toni da di Skol an Emsav da zeskiñ brezhoneg ha 'n em interesiñ gant traoù Breizh. Ur startijenn dibar 'oa bet gwelet er mare-se, disheñvel diouzh startijenn mil-brudet ar bloazioù 70 war a lare ar "rummad kozh". Chais 'm eus da vout bet bevet ar birvilh-se, ha me gwail yaouank c'hoazh.

B straed Hoche : d'ar mare-se e oa ti SAE e kreiz-kêr Roazhon, chouk d'ar Parlaman. Kaer 'oa mont di da labourat, bemdez ha bep noz, e-pad dek vloaz koulz laëret. Eno eo 'm oa bet ar c'hañs da labourat war ma zamm hentenn ha d'amprouiñ anezhi. Eno e oa krog honnezh da dapout he brud. E-kreiz ar bloazioù 90 'oa bet aozet ar c'hav d'ober ur sal deskiñ evel a faot, gouest da zegemer strolladoù 25 a dud, hag afer 'oa. Ur sal beuvvat roet d'ur c'helenner moumounet gant e skipailh, ur sal a zegouezh din hunvreal enni c'hoazh, ha me bout kuitaet Breizh ugent vloaz bremañ, james na 'm eus kavet koulz e Kembre. Dont a ra soñj din ivez eus an ostaleri a oa tost da ti SAE : an *Nabuchoodonosor* ma veze servijet boued lip-e-bav dimp a-raok mont da gellenn ha traoù da evañ ken koulz all da heul ar c'hentelioù, un teuz !

Lena Louarn : n'hallfen ket me komz eus SAE hep ober anv eus Lena Louarn, ar vaouez a oa e penn an traoù d'ar mare-se. Hi an hini 'nevoa gwelet an darnvez kelenner a oa ennon, hi an hini 'nevoa bet ar vadelezh da reiñ tro d'ar c'hennard kreuc'hennet ma oas da brouñ ar pezh a oa kat d'ober. A-drugarez dezhi 'm oa kavet ma zammig hent er vuhez, hent ar c'helenner, un hent a heuliañ c'hoazh hiziv an deiz e Kembre. Hep Lena, Dulpenn ebet ! Mil bennozh deoc'h, Lena.

Paskal Nignol

Pa laran deoc'h : Skol an Emsav !

Skol an Emsav ? Piv 'ta ? Ah ya, SAE ! "Skol" 'veze graet anezhi kemend-all ! Homañ zo stag doc'h ma yaouankiz, ma faotr ! Graet 'm boa anaoudegezh ganti e dibenn an 20^{me} kantved da 'm soñj ! Pegoulz 'ta ? Oh, war-dro 1997 me 'gred ! Ur vray a goantenn, me lar dit, a oad ganin tamm-pe-damm, a-boan 30 vev ! Dre ur gemennadenn war gwagnnoù ar radio Canal B 'm boa klevet evit ar wech kentañ an iskis a anv-mañ : "Skol an Emsav", hag hi da lar 'barzh ar post e oa digor he dorioù d'ar re zedennet ganti he darvez ! Hopala ! Leun-chouk e oa an abaden, me lar dit ! Honnezh ne gomze ket galleg ha neuze 'm boa lakaet ma anv a-benn deskiñ ganti, ma karez !



Ah, Skol... Droug-hirnezh ma yaouankiz, ya ya ya ! Met ne oa ket homañ el ar re all, 'at ! Netra da walet, ma faotr ! Ur "pezh a unon" 'giz 'vez laëret ba' ma bro ! Ur bouhad tud ar he lerc'h, pa soñjan ! Studierien, kelennerien, tud dilabour ha mirc'hi-labour, paotr pe blac'h, kozh ha yaouank ha zoken... Servijoù sekret ar Stad (od a lare e oa ur vojenn ha me... n'on ket 'vit lar' dit !)

Leun a startijenn 'oa Skol d'ar c'houz-se ! D'an ampoent ma lare-hi e fin ur gentel skuzhus ha poanlus "Hey tudaù, petra 'reoc'h goude ar gentel 'peus bet ganin ?" Me hag ar gamaraded o respont dezhi 'ar un dro hag a vouez uhel "Er C'hleadagh Inn, O kabiten, ma c'habiten !" ha ni da vont... ganti evel-just !

Dalc'het ganti Dan McGuigan (ur paotr a Iwerzhon) e straed Dinan, an davarn *Claddagh Inn* zo bet hon astenn-skol a-hed ma deskerzh din-me. Lakaomp e oa sañset ur gentel-noz padin div eurad ! E gwirionez ne oa ket echu ar gentel a-raok na vehe hejet kloc'hig an davarn ganti. Dan e-unan mar plij, da lare eo 6 pe 7 eurad labour evidomp diouzh renk ! Gouñ 'rez ma faotr, ez eus bet stummet remziadoù a yezherien e mod-se ha kalz efedusoc'h 'n hentenn-se evit ar stummadurioù hir bremañ !

Chomet on ur pemp blez bennak ganti, pemp blez hag ur mor a blijadur, me lar dit ! War-lerc'h bout desket mat a-walc'h me 'gred, on aet kuit a-denn-askell trema un ti all nepell doc'h an ti-gar evit lakaat er pleustr ar pezh a oa bet desket ha bevet ganin.

Pa soñjan ennoet ma Skol ger, ma c'helenner, e teu pennoù boas din, pennoù ha na vint ket ankouaet ganin biken ! Laorañs, Tugdual, Ronan, Remy, Lus, Yann-Fañch, Lena, Tristan, Olier, Anne, Vaness, Fañch, Tif, Nadine ha tud all c'hoazh sur 'walc'h !

Setu dremm "dream team" Skol an Emsav !

Deiz-ha-biez laouen dit, Skol an Emsav ha dalc'h mat atav !

Katell Chantreau

Naontek vloaz 'oan e 1995, nevez eruet e Breizh, pa 'm boa bountet d'ar Skol an Emsav evit ar wech kentañ, stradañ Hoche. Dedennet 'oan gant ar c'hentellou "Istor Breizh" ha Nadine, ar sekretourez, louarnerez anezhi, he doa gwezhet din kentellou brezhoneg ouzhpenn: "Deus da wel!, ur wech pe div, ha ma plij dit, vo kavet ur mod d'an em renkañ evit ar paerant..."

Ha bec'h de' l'istor Breizh d'ar Meurzh noz gant Loeiz ar Beg, kelenner antanet gant e zarvez, ha brezhoneg d'ar Yaou noz gant Nikolaz Davalan, pedagogour eus ar c'hentañ ha paotr koant war ar marc'had. Digoret o deus din dorioù ur bed nevez ha degemerus. Dispar e oa deskiñ diouzh an noz, er sal dindan douar, c'hwez ar c'hozh enni, tud kozh ha yaouank mesk-ha-mesk. Nag a c'hoarzhadegoù ! Brav 'oa kaout un adskol ouzhpenn, ar c'hCladagh Inn, ur pub iwerzhonat dalc'het gant Dan, stradañ Dinan, evit astenn ar gentel. Bep bloaz 'euemp a-benn da badout un tamm pelloc'h e brezhoneg etrezomp. Pemp bloaz on bet o teskiñ a-raok kregiñ da gelenn da m'zo : un digare da reñf d'ar re all goude bezañ bet kement.

Ouzhpenn ur skol vrezhonek eo bet Skol an Emsav evidon : ur skol c'hoariva, ur skol bedagogiezh, ur lec'h deskadurezh pobi da vat evit em em stummañ, krouiñ, kejañ gant a bep seurt tud, tabutañ, labourat a-stroll ha stoum. Bennozh Doue d'an holl re o deus roet buhez da Skol an Emsav !



Erwan Burban

"Petra a zeu deoc'h pa glevit anv Skol an Emsav ?" Ervorenoù ha spi. Tremenet 'moa un nebeud bloavezhioù o lenn levrioù diwar-benn Breizh ha diwar-benn ar brezhoneg, pa oan krennard. Ne anavezan den ebet gouziek ha dedennet da vat gant kement-se, d'ar mare-se. Ar re gentañ 'm boa bet tro da gejañ ganto a oa bet Lena Louarn ha Nadine Enjelvin, a ra war-dro obererezhioù ar gevredigezh d'ar mare-se. Kement a fiziñs, a enargiezh hag a youl a oa enno ! Ur skouer eo bet Skol an Emsav evidon da vare ma yaouankiz, hag ur framenn ivez evit jinañ dazont ar yezh ha mont war-raok ganti. N'eus ket pell zo, un ugent vloaz bennak war-lerc'h, 'm eus bet tro da adkavout ar gevredigezh. Plijadur 'm eus bet o welet e oa deuet da vezañ ken micherel hag efedus, war dachenn ar stummadur dibaoe hag an embann. Spi 'm eus e c'hellou skipailh ha tud a youl vat ar gevredigezh kenderc'hel da jinañ traoù nevez, troet war-ze ar vuhez pemdez e brezhoneg (boued, sinema, sport...). Pouezus-kenañ eo o labour evit brezhonegerien Bro-Roazhon ha Breizh-Uhel.



Laurence Guillo & Christine Talarmin

Kentellou Skol an Emsav a oa bet un "nor digor" war ar brezhoneg evidomp e 2000 ha kalz muioc'h gant krouidigezh ar strollad c'hoariva Barzhanoff ur bloaz war-lerc'h, gant sikour SAE hag ar pal souezhañ ha lakaat an dud da c'hoarzhin ! Verboù a zeu deomp pa soñjomp en-dro er bloavezhioù-se :

Krouiñ pezhioù-c'hoari : n'hallomp ket disoñjal tudennou *Muntir er Vro Vigoudenn*, an inspektor Mavel, e ganeñ Eujan Korneg, ar chaloni Kefeleg, Gaid Blaiz... ; na Jennifer-Kevina, John-Brantien e *Kig-ha-Faltaz* pe ar wenienn he doa c'hoant da zimeziñ gant ur c'har-nij e *Glebañoù boemus* skrivet evit ar vugale.

Buheziñ gouelioù fin ar bloaz : krogel hor boa un novezh gouel gant daou aktour azezet ouzh taol, ur youlallhad sistr e-kreiz, ger ebet ganto e-pad pemp munut, nemet o c'hrozmolad a-wechoù. Nag a bikoù-gouennata e sellou an arvesterien ! "Ur gudenn zo ?". Er fin e erue Laurence gant mouezh Arle : "Un haiku post-modern eo ar pezh emaoch o paouez gwelet"... Pe c'hoazh strollad Barzhanoff kanol istorel oc'h erc'houet gant bombezennou dour !

Pignat dreist porrastell Skol an Emsav d'ur Sul hor boa da bleuistriñ... ha traoù all n'hallomp ket anv, nemet etre daouarn ur bouevr !



Labourerezed ha labourerien Skol an Emsav

Setu roll an holl re bet gopret gant Skol an Emsav betek-henn, evit kelenn, ren, merañ, degemer ha tiorañ an dud, skrivañ, embann, brudañ... Lena Louarn, Nadine Enjelvin, Jean-Michel Roymard, Kristell Quinton, Kristenn Gouvez, Sarah Bonneau, Lus Bimont-Chauveau, Mark Decambourg, Solenn Georgeault, Tangi Olivier, Hoel Louarn, Morvenn Audic, Laurence Guéguen, Fañch Dupuis, Gwernn Rambaud, Tifenn Grandjean, Milo Latimier, Vanessa Burguère, Anne Broussot, Fañch Roy, Benoit Lardière, Gael Robin, Tugdual Karterer, Nolwenn Guignard, Fabris Cadou, Fañch Oger, Manuel Biannic, Yannig Boulard, Joan Bizien, Gwennael Jéquel, Sandrine Gauvain-Temporelli, Arnaud Abdulsater, Karen Kechis, Anton Châteller, Vladislav Ezhov, Denez Bodat, Morgan Caland, Charlotte Papali, Joris Brouard, Kaelig Couëteller, Maksim Touzé, Tomaz Laken-Jacques, Thibaud Erkelens, Camille Cousin, Djibril Aatif, Jérôme Bouthier, Anna al Lay, Valérie Kervella, Benead Vernon, Bastien Barbé, Clara Beaugendre, Pér Morvan, Hélène Bonniac, Marzhin Perrot.

Hep labour a-zevri ar c'hantadoù a dud o deus kaset Skol an Emsav war-raok a youl vat abaoe an deroù ne vefe ket bet ken hir roll an Implijidi, evel-just. Mil trugarez dezho !

Maksim Touzé

Petra a zeu deoc'h pa glevit anv Skol an Emsav ? Ur mousc'hoarzh a zeu din ! Hag ur santimant a nestet gant an hini en deus graet anv eus Skol an Emsav, dreist-holl m'en deus graet ar stummadur ivez. Ur prantad mil a-bouez eo bet evidon ma frantad e Skol an Emsav. N'eo ket netra deskiñ ur yezh dindan ken nebeut a amzer, dreist-holl pa diouzhtu goude ma stummadur, ar pezh en deus servijet kalz evit mont war-raok, ur seurt "goudestummadur". Ha gant Bremañ em eus skrivet ma fennadoù kentañ e brezhoneg, ar pezh a ran ingal evit kasetennou a bep seurt dibaoe. Cherchet e oa bet ma buhez goude bazañ desket brezhoneg, setu ne c'hallin ankouat al lec'h m'am eus e c'raet.



Katelin al Lann

Un nor pe ur prenestr digor ha skliñjennet eo ha gwelet e vez ar pezh zo e-barzh pa vezit-c'hwi er-maez. Setu ar skeudenn a zeu din. Bezañ stummet war ar brezhoneg e-pad 6 miz en deus cherchet ma zammig buhez ! Roet ez eus bet al c'hwezioù din evit klevet, kaozeal ha bevañ em bro, em zi. Pebezh plijadur eo kompren an anvioù lec'h pe an anvioù tud, kompren ar c'hanoennoù, ar barzhonegoù, tостаат ouzh pinvidigezh ha sevenadur bro ma zadoù-kozh, ma bro-me ! Cherchet ez eus kalz traoù hag ar sell ouzh ar bed tro-dro din da gentañ, brasoc'h e seblant din bezañ ha tostoc'h war ur dro.



Julie Beaugendre



Ma istor gant Skol an Emsav hag ar brezhoneg 'oa komañset n'eus ket pell zo. E 2015, pa oan o c'hom e Pariz, 'moa bet tro da glevet ma breur hag a oa oc'h ober ar stummadur d'ar mare-se, ha ken buan 'oa deuet gentañ, 'moa gret ma soñj cherch buhez penn-da-benn. Distrañ da Vreizh hag ober ar stummadur en distro skol war-lerc'h. Ur bloavezh dispar 'oa, gret 'moa anaoudegezh gant tud tre hag a zo mignoned din bremañ. Hag hiriv an daiz 'm eus ur yezh ouzhpenn da c'hoari, da c'hoarzhin, da vezañ ha da labourat ganti. Ha tout-se a-drugarez da Skol an Emsav hag he skipailh a-feson.

Melaine Looten



Da viken e talc'hin soñj eus ar etaj kentañ bet heulet ganin e 2010. Ouzhpenn kelenn brezhoneg din o doa graet stummen ha stummezad Skol an Emsav. Ambrouget o doa ac'hanon war hent ar yezh. E 2012 em boa gallet heuliañ ar stummadur 6 miz. E fin ar 6 miz-se ne oa ket da dortal ken, dav e oa din kenderc'hel ganti, mont pelloc'h zoken. Abaoe pemp bloaz e labouran e Ti Yezhoù ha Sevenadur. Abaoe pemp bloaz neuze 'mas tro da welet stajidi ha stajidoù o kregiñ gant ar yezh hag o vont war-raok a zeiz da zeiz, a viz da viz. Ha dont da vezañ ampart evit lod anezho. Pa glevan Skol an Emsav neuze e c'hellan lar' : efodus eo !

Erwan Lhermenier

Pouezus-kenañ eo ar gevredigezh-se evit kenderc'hel ha lakaat da vezañ ar yezh : e Breizh-Uhel dreist-holl, e Breizh, hag ivez er bed a-bezh. Roet ha deus tro din da c'hellout komz ha kanañ muioc'h-mui gant plijadur ha gant brezhonegerien a bep seurt. Joa zo ennon pa glevan hec'h anv ! Klevet 'moa anezhan ar wech kentañ e-pad ar stajou a veze kinniget e Ti Kendalc'h, e Sant-Visant-an-Oud. Heulet em boa war-lerc'h in bloaz kentellou-noz e Redon kanoazel gant ar gevredigezh brezhoneg 6 miz-pad, a-benn ar fin, e Roazhon, gant ur skipailh a-feson. Ur gefridi ekologiezh sevenadurel a vez kaset da benn ganto. Setu perak e son Skol an Emsav em c'halon !



Boula an Noë-Lambert, digoret e 2008. sk. © Alain Tarcelin

Bouloù Naoned?

Deomp da c'hoari!

Kuzh e-pad pell a-dreñv kafedioù zo, e-touez dudiamantoù ar vicherourien a renk sokial izel etre an daou vrezel e Naoned, bouloù Naoned (*Boule Nantaise*) zo ur c'hoari pobl eeun e live ampartiz uhel, tost d'ar bilhard, sioul, en enep d'ar sportoù anavezetañ troet war anarc'hant brashagarvestoù estlammus tud a vicher. Deomp war roudoù furnez adkavet bouloù Naoned...



Izili eus Kenseurtiezh an Durantière, e-kerzh an 20^{vet} kantved.

Unan eus ar c'hoarioù pobl na gaver nemet e Bro-Naoned eo ar *Boule Nantaise*, bouloù Naoned. Dianav a-walc'h eo : nebeut a roudoù skrivet a chom eus an hengoun dre gomz. Krouet gant micherourien hag a labourer war gobiri, hervez ar vojenn, e oa en em ledet war an douaroù betek Bro-Raez, ma kaver an adstumm da vouloù Naoned anvet "*Boule Bernierienne*" (bouloù Kerverner-Raez). Abaoe deroù an 20^{vet} kantved e vez choariet e dreksaliou kafedioù savet a-ratozh.

AR VOJENN

Ur vojenn e vefe orin ar c'hoari : war ar c'hoiri a zidraezhe ar stêr-veur hag a dreuzkase an traezh, e choariet merdeerien zo o teurel bouloù el lech stokañ, skarzhet

an traezh dioutañ. Evit distennañ goude o devezh labour o doa jinet an diduamant-se. Dre skipailh e vannent ar bouloù koad gwez-galak bet soubet en dour evit o duañ muioc'h. Ar bouloù a winte-diwinte eus an eil kostez d'egle abalamour da stumm kromm kouch ar c'hoiri.

En tu all d'ar vojenn eo testeniet an tachennoù e douar palumet ha diaes e oa kempenn anezho. Adalek ar bloavezhioù 1950 e voe graet gant un danvez kaletoc'h ha riklusoc'h : ar bitum, gwellaet e rekiye gant Yves an Hir, un ijinour eus ar chanterioù-bigi er bloavezhioù 1970, a llinas ivez ur mekanik da ledañ gwiskad al leour-choari.

E-keñver ar bouloù n'eo ket aet an traoù war wellaat. Oberiet e vezent en un embre-

gerez staliet e Gourin, aet da get. Abaoe e vezont graet en estrenvro, e Sina, gant un embregerezh italian ken arbennik ma faout ar bouloù, siwazh. Da goll ez a ar gouiziegezhioù lechel.

DEROÙ AN 20^{vet} KANTVED

Ofiselaet e voe ar pleustr-se e deroù an 20^{vet} kantved dindan stumm kevredigezhioù anvet kenseurtiezhou. Ar choarierien a bilje dezho kaout dudi goude o devezhioù labour hag en dibennoù-sizhun war dachennoù choari bouloù m'en em gavent evit steññ gwer ivez, kement hag ober. En-dro d'ar chanterioù poblek e oa en em ledet e-kreiz an 19^{vet} kantved, ur mare ma oa Naoned e kreiz-kreiz ul lusk kêriekaat ha greantelaat.

Ar vicherourien a oa bet ar re gentañ o pleustriñ war ar c'hoari-se. Tamm-hamm ez eas doareoù choari raktal arvalien ar c'hafedioù diwar hent pleustroù aozet ar kenseurtied. Dindan an anv "kenseurt" e oa ur c'hoant da greñvaat ar spered stroll, ober d'ar choarioù-se bezañ lechliou emgav piljus. Pep tachenñ he doa he reolennoù dezhi hec'h-unan, eno e oa spered bouloù Naoned, hep gouzout d'an dud avat. Dre ma veze muioc'h-mui a choarierien nevez e fellas d'ar kenseurtied bodañ an holl choarierien evit o unvaniñ en-dro d'un doare c'hoari boutin.

REOLENNOÙ BOUTIN HA KENSTRIVADEGOÙ

Gant krouidigezh ar c'henseurtiezhioù e voe kendonet ar reolennoù ha graet d'an holl anavezout al lechliou-c'hoari disheñvel dre ar c'henstrivadegoù. E 1913 e voe krouet ar kenseurtiezh kentañ en ez-kafedi *La Bande* e Naoned, savet gant Louis Le Texier, kuzulier-kêr anezhañ. Evel en holl ziduamantoù e savas ar c'hoant da genstrivañ er choarierien. Setu perak e klaskas ar c'henseurtiezhioù aozañ daeadegoù (*challenge*) kenetrezo, hag a veze klotet atav war un ton iaouen en-dro d'ur banvez.

Pep kenseurtiezh zo e karg eus aozañ ha degemer ar c'henseurtiezhioù all da-geñver ur genstrivadeg bep daou vloaz. Pemp kenstrivadeg vloaziek zo, en o zouez Priz Meur Kuzul-departamant al Liger-Atlantel e dibenn ar c'hwec'hiz kantañ, hag e miz Kerzu Priz Meur Kêr Naoned.



© Alain Tarcelin

Ur c'hoariet eus Kenseurtiezh ar Bowling.

Abaoe 2001 eo ezel ar *Fédération des Amicales de la Boule Nantaise* (FABN), krouet e 1930 dindan anv an AABN, eus ar gevread *Fédération des amis de la lutte et des sports et jeux d'adresse de Bretagne* (FALSAB), a vod poellgorioù, kluboù ha kevredigezhioù e Breizh a-bezh. Anavezet eo bet ar c'hoari bouloù Naoned evel Glad Sevenadurel Dizanvezel Frañs hevlene.

AR C'HENSEURTIEZHIOÙ BREMAN

Ne chom nemet dek kenseurtiezh oberiant diwar an tregont bennak a oa betek ar bloavezhioù 1960. Daoust da se ez eus bet roet lañs d'ar choari en-dro gant abadennoù deskiñ kenaozet gant kenseurtiezh bet an Durantière ha Skol Diwan Naoned adalek 2004, a-drugarez da Alain Tarcelin, ez-sekretour an FABN ha Roger Monnier, ez-prezidant an Durantière. Gant digoradur boula an Noë-Lambert e-kreiz miz

Mezheven 2008, lidet dirak Jean-Marc Ayrault, maer Naoned d'ar mare-se, e c'hall strolladoù niverus (skoldi pergen) c'hoari en ur boula dizalc'h diouzh ur c'hafedi. Abaoe 2013 e kinnig Skol an Emsav div abadenn c'hoari bouloù Naoned, da-geñver ar stummadur uhel bloaziek.

Evit an deraouidi n'int ket ezel eus kerentiezh ebet e c'hellont deskiñ choari da vare prantadoù zo pe c'hoari etre mignonned evit 2 euro dre zren hepken, evel e kafedi *Aux petits joueurs*, e Karter Sant Donasian. War ziorren emañ ar c'hoari, e vrud hag e berzh, betek aloubiñ an Il-ha-Gwilen ! Evit gwir e voe lidet digoradur ar roudenn-choari bouloù Naoned La Jauritre d'ar 7 a viz Ebrel 2019, e Moustereffil (s.o. p. 26).

Alain Tarcelin hag Arno Abdul-Sater
Trugarez da Philippe Gicquel, prezidant an FABN
Evit gouzout hiroc'h : www.fabn.fr

Fanny



© Alain Tarcelin
Ur "Fanny" livet gant Lolo Pinson.

Na fiziañ ket en diavaez ! Pokat da Fanny n'eo ket ur c'hopradenn (erfin, diouzh ar Fanny a vez, atav !). Talvezout a ra kement ha koll ur c'hoariadenn hep bezañ merket poent abet.

Eus Savilla e vefe an hengoun-as. Un ostez e kafedi Grand-Lemps e vije bet ar Fanny gentañ, un tammig e-riok ar Brezel Bad Kentañ. Hervez ar vojenn, dre goantiri, e leze da bokat outi an arvalien a oa o paouez bezañ bet trec'het hep bezañ bet merket an disterañ poent ar c'hoari bouloù. War he jod e veza graet ar pok-se.

Betek an deiz ma voe trec'het an antron maer ha ma leuas da "bokaoua" d'e dro, Marize he doa Fanny miret grun outañ ha felout a reas dezhi mezhekaat anezhañ dirak an holl ? Den ne car. Ar pezh zo sur avat eo e pignas war ur gador, sevel e lostennoù hag astenn dezhañ... he felfsoù ! Ne oa ket brav divarç'hañ anezhañ. Ken buan hag an avel e voe klevet daou bok tregernus er c'hafedi. Deroù an hengoun hir e voe...

An dalc'h eo n'o devez ket ar c'hoarierien ur Fanny en o c'herzh, pe zokenoc'h ur Fanny a asantef diskouet he felfsoù dirak an holl. Setu perak e vez miret ul lec'h a enor evit ur Fanny faos en holl lechliou ma vez choariet bouloù Naoned. Ar paourkaezh lud trec'het zo ret dezho mont da bokat da beñsoù bouren ur Fanny skudennoasiet en un daolenn, ur Fanny briaj pe gizellet. E-giz-se eo deuet ar c'hopradenn da vout ar vezhekadenn uhelañ evit kement c'hoariet bouloù Naoned zo.

A.T. hag A.A.-S.

Bouloù Naoned e ti La Jaupitre

Er C'hàrouj, kreizenn La Jaupitre, kevredigezh c'hoarioù ha sportoù breton ha galloù, e voe lidet sevenidigezh un dachenn c'hoari bouloù Naoned mod-kozh, hogen nevez-flamm, d'ar Sul 7 a viz Ebrel e Mousterfil. Dominig Ferré, prezidant ar gevredigezh a gont istor al labour dibar-se.



Chanter an dachenn c'hoari bouloù Naoned e Mousterfil hag al lid digeriñ.

Penaos eo deuet deoc'h ar soñj da zegemer bouloù Naoned e-touez c'hoarioù ar C'hàrouj er bloaz-mañ ?

Egwirionez eo anavezet bouloù Naoned gant La Jaupitre abaoe pell. E 1994, da-heul embannadur levr Joël Guilbert, mestr prezegenner e Skol-veur Naoned, gouestlet d'ar c'hoari-se, *Joueurs de boules en pays nantais : double charge avec talon* gant an ti-embann L'Harmattan, e oamp bet e darempred gant unan eus ar c'henseurtiezhoù, bet o welet anezho war al lech ha graet anaoudegezh gant ar c'hoari. Distroet d'hor bro, binvilh ennomp, hor boa divizet sevel un dachenn war lechienn gumunel ar Bétangeais e Mousterfil. Adalek miz Meurzh 1994 e oa bouletet ar chanter da seveniñ ur roudenn-c'hoari palumet, skoazellet ma oamp gant un arbennigour war ar sevel tiez gant douar. Prest evit ar c'hoari e voe an dachenn e miz Gouere 1994. Distrujet e voe un nebeud bloavezhioù goude evelkent, war zigarez kempenn parklech al lechienn. Da neuze hor boa touet adsevel anezhi.

Abaoe hon eus bet dalchet darempredoù gant ar *Fédération des Amicales de la Boule Nantaise* (FABN) ha da-geñver abadennoù liesseurt (kejadennoù, kendalc'hioù, lidoù-digeriñ...), omp bet distroet meur a wech da Naoned. Da vare empeniñ ar C'hàrouj, ar park duer c'hoarioù breton, etre 2011 ha 2014, hor boa divizet degemer bouloù Naoned en dachenn diavaez.

Digoradur ar park, lidet e miz Mae 2015, en deus daleet al larfs da reiñ d'ar chanter. E miz Eost 2016 an hini eo o doa staget 47 den yaouank deuet eus Norvegia, Portugal, Spagn, ar Rouantelezh-Unanet, Italia ha Frañs, gant ar chanter, da-geñver ur *Roverway*, bodadeg etrebroadel re hemañ holl gevrennoù skouted Europa evit seveniñ raktresoù keodedel. Dindan reneriezh youlidi hag implijiñ-bad ar gevredigezh e voe savet ar blaenadenn d'ar 6 a viz Eost. D'an 10 eñjont kuit evit ur vodadeg diwezhañ e Roazhon. Kendalc'het e voe ar chanter betek 2018 gant ur strollad youlidi : ar vogerig ribl e skilt arruz ha douar hag ar roudenn gant douar priek.

Penaos emaoch e-sell d'e vrudañ ?

N'hon eus ket soñjet en doare da vrudañ anezhañ disheñvel c'hoazh. Kinigig a reomp da weladennerien ar C'hàrouj ober anaoudegezh gantañ. Graet hon eus hor mad eus ar *fest Gallies en fête*, d'an 29 ha 30 a viz Mezheven, evit ma vo anavezetoc'h. Gortoz a reomp gwelet penaos e troio toif an dachenn ar-raok mont pelloc'h gant ar brudañ. E-sell emaoomp da bediñ an FABN adarre er bloaz a zeu da-geñver un darvoud all.

Dastumet gant A.A.-S.

Evit gouzout hiroc'h : <https://jeuxbretons.bzh> <https://carouj.bzh>

Reolennoù bouloù Naoned (diwar fichenn ar FALSAB)

Orin : C'hoariet abaoe deroù an 20^m kantved e Bro-Naoned ha brudet e-keñver ar sevel bigi. Hervez ar vojenn eo bet awenet stumm an dachenn gant hini strad ar c'hobiri.

Pennaenn ar c'hoari : ar c'hoari ampartz-se zo e bal tostaat ar muiañ ar bouloù bras d'an hini vihan. Evit dont a-benn eo ret ober da bep boul ruihal betek an hini vihan pe peliaat ur voul enep. Gallout a reer c'hoari eun e-kreiz, pe ziseun oc'h ober d'ar voul pignat ha diskenn gant kostezioù kromm ar c'hoari, pe c'hoazh dont en-dro goude stekiñ ouzh penn all an dachenn (*faire un talon*).

Tachenn : ur gorread skouergornek, kollare, flour ha kallet eo tachenn ar c'hoari. Etre 13 m ha 15 m harder anezhi, hag etre 4.60 m pe 5 m ledander e c'hall bezañ. Kromm eo an dachenn : ar riboù a-hed ar c'hoari zo uheloc'h eget ar c'hreiz. A bep tu ez eus daou blankenn koad, anvet talons, hag a sikour ar bouloù da adlammat ha da zistreiñ.

Dafar boas : gwechall e oant e koad gwiaz-galak pe e koad beuz, bremañ e rousin sintetek, 12 boul 140 mm o zrezuz ha ken ponner ha 1700 gramm. En o zouesk, 6 boul *blanches*, 6 boul *noires* hag an hini vihan *petit* (da lavaret eo ar mestr), 100 mm ha zrezuz ha ken ponner hag 800 gramm.

Aozañ : gant daou skipailh unan, daou pe dri dan e vez c'hoariet. Ar c'hoarierien e pep laz en em glev war an urzh ha na cheñch ket e-kerzh an abaden : ar c'habiten (an hini barrekañ) en dibenn. O tennañ pill pe groaz e tivizer liv pep laz. Ar re zu a grog atav.

Pennberezeh : ret eo tresañ a-spered roud ar voul ha, diouzh strategiezh ar skipailh, merañ tu ha nerzh ar bannadennoù diouzh ma 'z eus c'hoant da dostaat pe da skarzhañ (ana e tie ar voul ruihal hepken evit na vefe ket kieziet an dachenn gant stokadennoù bouloù o kouezhañ : arabat ober ur pok).

Deroù ar c'hoari : ouzh an talon e tle bezañ seul ar c'hoariet a vann. Ret eo lakaat ar voul da ruihal kerken ha hi war an dachenn. Ur voul lakaat war an dachenn ha distoket an dorn diouzh c'hoariet.

Mont en-dro : ar *petit* a vez bannet gant ar c'hoariet kentañ hag e voul gentañ diouzh tu goude. Kement-se a-raok lezel e dro d'ar c'hoariet kentañ eus al laz all. Hemañ a glask tostaat muic'h d'ar *petit* evit markañ ar poent. Goude bezañ divizet pe liv eo al laz tostaat d'an hini vihan, ar c'houch n'emañ ket ar poent gantañ a gendalc'h da c'hoari betek cheñch tu d'an traoù.

Echuet e vez an abaden na vez bet c'hoariet an holl vouloù. M'emañ an daou skipailh a-du an eil gant egle e vez merket ar poentoù war-bouez un horolaj dre skipailh hag ur bir da ziskouez sifr ar poentou.

Ma n'emañ ket e vez goulet digant an tredeog muzulian ha gant ur blouzerin an hini e vez kerfveriet an hedoù etre ar bouloù.


Aclhañset eo ar c'hoari er penn all d'an dachenn o vannañ an hini vihan.

Echuet e vez da vat pa vez merket nav foent gant ur skipailh.


A.T. hag A.A.-S.

Tresadenn gant Alain Tarcelin, ez-sekretour d'an FABN.

Croquis



Vue en coupe



Un tredeg zo a "pouezennañ" bouloù, daou c'hoariet (unan gant bouloù du, egle gant bouloù gwenn) evit gwelet penho zo an tostaat d'ar *petit* (ar mestr).

Emañ skipailh **Bremañ** o klask kenskriverien nevez bapred, brezhonegerien gouest da blodif gant danvezioù liessourt.
N'ho peus ken nemet kas ur gerig da: bremañ@skolanemsav.bzh

Evit gouzout hiroc'h pe koumanant'h d'ar gelaouenn:

www.skolanemsav.bzh

ha pajenn Facebook **Bremañ**

Digoust
Gratuit

GOUEL SEVENADUR BREIZH FÊTE DE LA CULTURE BRETONNE
#2

deus'ta!

9 & 10
A VIZ DU
NOVEMBRE
2019

BREST
ATELIERS DES CAPUCINS
deusta.bzh

YANN TIERSEN • RED CARDELL • PLANTEC
MOJO • NDIAZ • TALEC NOQUET QUARTET • TEKMAO
TINY FEET • PERYNN & ELISE • FUNKY DIRTY CHICKEN
KEVRENN SANT MARK • JAKEZ AR BORGH • PAF LE CHIEH

Reizhodenn

Goulenet ez eus bet diganimp klokaat un tammig danvez ar pennad en niv.426. Praeg a-raok d'ar stêr-veur. Un albez eus ar protestantizh e Breizh er 16th ha 17th kantved. Ar zo ennañ eus ar Grouzad "e Breizh-Uhel". Mat eo resisaat e vevz lakaet ar Grouzad e Breizh-Uhel er 16th kantved, da lavaret eo er vio vrezhonek (bevenn ar brezhoneg an hanternoz a yas betek Sant-Brieg).

Fest-noz Diwan Kemitron-al-Lann

Kuzul skozell Diwan Kemitron-al-Lann a aozo ur fest-noz d'ar Gwener 25 a viz Du 2019 evit brudañ ar gevredigezh ha dastum ar c'hiant. Ar gevredigezh zo bet savet e miz Mezheven 2019.

Evit gouzout hiroc'h
skozell.diwan.kemitron@gmail.com

FEST-NOZ
25/10/2019

SANS FACON
A-STROLL
PEDROU-LARDIÈRE
AMZER ZO

Notre Dame des Landes
KEMITRON AL LANN

Al Liamm - Tir na nÓg

Ar gelaouenn sevenadurel e brezhoneg

Bep eil miz: 130 pajenn gant danevelloù, barzhonegoù, studiadennoù diwar-benn ar yezh, an istor, ar skrivagnerien, barnadennoù kevrioù diwar yezhoù a bep seurt, nevezantenn brezhoneg Breizh, notennoù kelenner diwar-benn ar yezh a c'hoarvez e brezhoneg e Breizh.

35€ ar bloaz (stumm nivere! 15€)

>> Koumanantit! <<

Evit gouzout hiroc'h pe koumanant'h d'ar gelaouenn:

<http://alliamm.bzh>



Labourzo

Ur berveg aspar zo bet savet gant ziliñ an Ubapar. Labourzo e anv. Ul lec'hienn internet eo, digor d'an holl, evit strolañ ar c'hinnigoù hag ar gouarnemoù labour, ur "pôble employé" brezhonek en ur mod. Renablñ a ra fichennoù kinnig-labour (postoù brezhonek pe divyezhek) ha fichennoù brezhonegerien hag a zo o klask labour. Ouzhpenn 300 den (implerien ha klaskerien labour) zo enrollet evit bremañ.

Evit gouzout hiroc'h: <http://labourzo.ubapar.bzh>



Lennit bremañ!

Breizh hag ar bed

39€^{CHF} ar bloaz
6 nivereenn
32 bajenn



Dibabit etre tri doare da baeañ ho koumanant da **Vremañ**

► **dre chekenn** koumanant bloaz 39€ | e-maez pennvro Frañs 49€ | skozell adalek 50€
war anv Skol an Emsav

Règlement par chèque à l'ordre de Skol an Emsav, accompagné des coordonnées de l'abonné.

► **dre internet** koumanant bloaz 39€ | e-maez pennvro Frañs 49€ | skozell adalek 50€
e lec'hienn Skol an Emsav ► paeañ enlinenn a c'hallit ober gant ur gartenn-vank (PayPal) e www.skolanemsav.bzh

Règlement sur internet par carte bancaire (PayPal). Rendez-vous sur www.skolanemsav.bzh

► **dre lamadenn viziek** ordinal 3,25€ | e-maez pennvro Frañs 4€ | skozell 4€
kast ho taveannoù-bank (DAB) gant ar sammad da lemel dibabet ► an urzh-paeañ SEPA da sinañ a vo kaset deoc'h gant Skol an Emsav

Règlement par prélèvement mensuel. Joindre un RIB et cocher le montant souhaité. Le mandat SEPA à signer vous sera envoyé par Skol an Emsav.

Anv ha chomlec'h an den koumanant | Coordonnées de l'abonné

Anv|Nom.....
Anv-bihan|Prénom.....
Chomlec'h|Adresse.....
Kumun|Commune.....
Pgz|Tél.....

Kod-post|CP.....
Bro|Pays.....
Postel|Courriel.....

...ha gwiskit STERED!

www.stered.eu

Koumanantit diouzhtu-dak hag e profo Bremañ deoc'h ur rochedig Stered.

Ya, fellout a ra din kaout ur rochedig Stered gant ma c'houmanant da v-Bremañ.

T-shirt evit ar baotred

ment : S M L XL XXL

T-shirt evit ar merc'hed

ment : S M L XL



Talvezout a ra ar prof-mañ evit ar goumananterien nevez hepken, betek ma vo echu ar stokou. Pezhioù-dilhad Stered profet betek an 31 a viz Here 2019.

T-shirtoù evit ar baotred, pemp ment : S, M, L, XL hag XXL. Top evit ar merc'hed, pevar ment : S, M, L hag XL. Liv ha skrid ar rochedigoù a vo diouzhtu ar stokou.

► da gas da: Bremañ - 8 trolec'h Sant-Albin - 35000 Roazhon - Breizh

Ar folien-mañ a c'haller pellgargañ diwar al lec'hienn internet www.skolanemsav.bzh



Skol an Emsav

1969
2019

Lid 50 vloaz

4 & 5 a viz Here 2019

GWENER 4 A VIZ HERE
7E > 4BIS

. Istor Skol an Emsav

Ur film gant Yowan Denez
Produet gant France 3 Breizh

. Taol grenn

Da-heul ar skignañ e vo dalc'het un daol grenn gant
re hag o deus graet hag a ra istor Skol an Emsav

SADORN 5 A VIZ HERE
> **TI AR C'HEVREDIGEZHIOÙ**

**. Adalek 10e > Adperc'hennañ ar yezh dre
ar c'helenn d'an dud deuet**

10e30 > 12e30 : Kelenn yezhoù minoralet
d'an dud deuet en un endro stadel gall
Katalonia an Norzh - Iparralde - Okitania

14e > 16e : Ar c'helenn d'an dud deuet e Breizh
Strategiezh diorren, ar palioù, an efedusted,
ar bedagogiezh, emdroadur ar c'helenn d'an dud
deuet en 50 vloaz tremenet

16e30 > 18e : Peseurt politikerezh evit ar c'helenn
d'an dud deuet e Breizh ?
Gant dilennidi ha dileuridi strolladoù politikel

18e : Kotel koan profet gant Skol an Emsav

TITOUROÙ :

4 bis > cours des alliés

Ti ar c'hevredigezhioù > 6 cours des alliés
Metro : Charles de Gaulle

Skol an Emsav >

8 trolec'h Sant Albin / contour Saint-Aubin
degemer@skolanemsav.bzh - 02 99 38 75 83 -
www.skolanemsav.bzh

E Roazhon

Ti ar c'hevredigezhioù



rennes



4 bis